


KALEDVOULC'H
(Erwan Berthou)

Lemenik

skouer ar Varzed



PLEUBIAN
E TI AN OBEROUR
MCMXIV

Da Charles Belenger
"Difenne Breij"

& seveil

Kaloudoulch

Lemenik skouer ar Varzed

LEVROU ALL ERWAN BERTHOU

Cœur Breton, poésies, Godfroy, éd., 1892. *Epuisé.*

La Lande Fleurie, poème, Lemerre, éd., 1894.
3 fr.

Les Fontaines Miraculeuses, poésies, Lemerre, éd.,
1896. 3 fr.

Ames Simples, poème dramatique, Lemerre, éd.,
1896. 3 fr.

La Semaine des Quatre Jedis, Ballades, hors
commerce, 1898.

Le Pays qui Parle, poèmes, Lemerre, éd., 1903.
3 fr.

Dre an Delen bag ar C'born-Boud, poésies bre-
tonnes, Prud'homme, St-Brieuc, 1904, 8 r.

Triades des Bardes de l'Île de Bretagne, l'Occi-
dent, éd., 1907. 2 fr.

Istor Breiz, en collaboration (Trivarz), Le Dault,
éd., 1910. 4 r.

Kevrin Barzed Breiz, H. Champion, éd., 1912.
o fr. 50.

Les Vessies pour des Lanternes, Figuière, éd.,
1913. 3 fr. 50.


DA VEZA EMBANNET HEP DALE :

Le Trégor à Travers Champs.

Gériadur ar Barz.

Sous les Chênes Druidiques.

33017



LEMENIK e 1901

KALEDVOULC'H
(Erwan Berthou)

Lemenik

skouer ar Varzed



PLEUBIAN
E TI AN OBEROUR

MCMXIV

FB
891-
633
BER

N^o 10

Al levr-ma

a zo bet moulllet dioutan

kant hanter kant niveren

ha n'int ket bet laket er c'hemwerz

RAK-SKRID

Sevenet an diouganou :

Levenez 'leiz ar c'halonou,

Hag an Awen Veur o c'houeza

War Spered Breiz o tistriza.

War an Dôlvén eo graet al Le :

An eur a zono hepdale.

Arru Lemenik gwenn-varo,

Lemenik an Trec'her garo.

'Dont a raio 'vel tarz-an-deiz,

Ha war e lerc'h e kerzo Breiz.

Eman war ribl ster an Elorn,

Kleze Arzur lufrus 'n e zorn.

E vleo loued, mez 'n e galon.

E verv gwad kadarn eul leon.

E armeou a yelo pell,

Pelloc'h 'vit beven Breiz-Izel.

Stourmi outan den n'hen gallo,

Na Zaoz, na Roman na Gallo.

Arru ! 'Dazorc'her hor Frankiz,

Lemenik, levenez Breiziz.

I

Ar C'horf

Sevel a raio harnezet
War e wele a varo.
Mont a raio da lemma
E zent ouz dero Bro-C'hall.

AN DIOUGANER.

I

PAOURENTEZ

War varlen e vamm Breiz

Lemenik a c'hanas e Rostrenn, an 10 a viz mae 1855, da zek eur vintin. Koef an eurvad a oa war e benn ha poueza a rê dek liur, pouez talvoudus evit eur c'hrouadur-den o tont war an douar. Hogen ezom bras en devoa da gaout nerz evit beza gouest da veva eur yaouankiz ken kriz hag an hini en deus bet.

E dad, Gwillerm ar Fustek, a oa hucher ; addimezet e oa evit an eil gwech : e daerved gwreg e oa Katrin ar Barz.

Beza en devoa daou vugel eus e wreg kenta, eur verc'h hag eur mab. Heman a

zo bet beleg ha marvet ez eo bet person e parrez Ploulec'h.

Katrin ar Barz a roas da Willerm ar Fustek pemp pe c'houec'h bugel ; Lemenik a voe unan anê. Roet e voe d'ezan an hano a Yann.

Tud ar Fustek a oa eus ar Stang-Nevez, etre Plizidi, Sant-Konan ha Sant-Jili-Plijo.

Tud ar Barz a oa eus ar Brugou, e parrez Gras, e kichen Gwengamp.

Goude ganedigez Lemenik, ar baourentez en em stagas bemdez mui-ouz-mui ouz tiegez e dud, hag a gendalc'has ken n'arruas gant ar re-man gouzanv an dua ezom.

Lemenik a voe kaset d'ar skol azalek e genta bloaveziou. Raktal ma voe laket war ar bankou, e tiskouezas eur spered dreist da hini ar vugaligou all. Goude beza tremenet daou vloa hanter e ti an itron Bourc'hiz, e voe kaset da di frerien

Kompostal. Oajet e oa a bemp bloa. Eno, e-pad pevar bloa, den n'hallas hen staga ouz ar skol. Petore nerz a voute anezan da bellaat diouz ar studi ? N'ez eus fors ! Pez a zo gwir ez eo ne gave peuc'h ebet en e galon a vogel, na levenez ebet, nemet pa helle mont da redek ar maeziou, kouls e-pad ar goanv eget e-pad an hanv.

Hen e-unan en eus kontet d'e vignoned pegen laouen e veze, eur wech distroet diwar hent ar skol, o redek dre ar parkou goloet gant erc'h ha skorn ; pegen kaer e kave ar c'hoajou, gwennet gant ar reo, ha pegement a blijadur a gemere o c'hoari war ar steriou skornet.

— « Va mamm Breiz, emean, a ziwalles
« ac'hanoun. Ar vro a oa leun a vleizi hag
« a voc'h-gouez : bemdez e klevet ar
« bleizi-man oc'h harzal spontus endro da
« gaerig Rostrenn, war ar menezioù, ha
« den ne grede chom e-maez goude an

« abardaez. Alies e veze klevet komz a
« walleuriou c'hoarvezet diwar al loened
« gouez ; ac'hanta, al loened gouez a
« zistroe dalc'hmad diwar va hent : bis-
« koaz n'em eus bet da c'hoari gante. »

E-pad an hanv, hevelep buez digabestr :
reded dre ar parkou, pa veze gwisket ken
kaer e vamm Breiz gant saeiou alaouret ar
meneziou ha gant glazur bleuniet an
traouniennou ; pa gane ken flour an evned
er gwez, dindan bannou an heol ; mont
da neuial bemdez, du-man, pe du-ze. Ne
rê netra ouspenn. Bepred e tremenas
diwallet rag an aered ha rag an holl
loened fall, daoust d'ezan beza bet alies
en lec'h da veza gwallet.

Katel Goelo

D'ar c'houlz-man, hag alies goude, Le-
menik a gave war e hent eur wrac'h koz

daoubleget, hanvet Katel Goelo, a oa o
chom en eul lochig ebarz eur ru vihan a
zav a dachen kaer da griben ar c'hra.

Katel, eun dervez, en em gavas eta war
hent ar bugel, ha hi da c'hervel anezan :

— « Deus aman, paotr bihan, ma welin
« da blaneden ez penn. »

Lemenik a zentas, ha Katel goz en em
lakaas da zilua e vleao gant he bizied ha da
niveri :

— Unan, daou, tri... Oh ! beza a zo
c'hoaz ! « pevar, pemp, c'houec'h... Hola
« vat ! Setu aman eur penn evel ne vez
« ket gwelet nemeur ! Seiz !.. Ac'hanta,
« paotrig, pinvidik e vezi. Eiz ! Nao !.. Ya,
« nao roz ez penn. Va feiz 'ta ! Biskoaz
« kemend-all n'am boa gweled. Nao roz !
« Va Doue ! Petra a zigouezo diouid ? Te
« a vezo eskob d'an nebeuta ! »

Ha konta a rê c'hoaz, hag adkonta, gant
aon rak beza faziet. Ha nao roz a gave

bepred. Daoulagad ar baourez kêz a c'hoarze d'ar gavaden. Hag aboue, ken lies gwech ma kave Lemenik war hec'h hent, e tiluie e vleo evit gwelout ar burzud-se : Nao roz en eur pennad bleo hepken ! Ha derc'hel a rê gant he flaneden :

— « Eskob ! te a vezo eskob, va mabig
« ker. Oh ! ya, d'an nebeuta ! »

Lemenik a dremene neuze e amzer vat war an douar, war galon e vamm Breiz.

Pa zigouezas gantan kaout nao bloa ha daou viz, e dud a gwitaas Rostrenn evit mont da chom da Wengamp, o kredi kaout eno gwelloc'h difenn enep ar baourentez.

Lemenik skolaer

Eun tammig harp a zeuas d'e dud dre eur c'hemwerz savet gante.

Lemenik a voe kaset adarre da skol ar frerien. Mont a reas, evel eun divroet, da

azeza war ar bankou nevez. Eur bloavez a dristidigez a dremenas eno, siouaz ! Achu 'oa amzer ar blijadur, amzer ar redadennoù war ar mez.

Ar bloa warlerc'h e voe kaset d'ar skollach. An dro-man e troas penn d'ar vaz : daoust d'ezan beza tremenet e vugaleach kenta hep labourat war ar studi, hep beza disket netra, daoust d'an holl kredi, endro d'ezan, e oa o vont da goll e amzer hag arc'hant e dud, er skol, azalek an deizioù kenta, Lemenik a grogas ken stard ha ken kalonek gant al labour, ken e savas d'ar c'henta renk. Aboue en eus miret ar renk-se keit m'ez eo bet er skollach, da lavarout eo, azalek miz here 1865 betek ar 25 a viz mae 1872.

Eno e spered a gavas da c'hoari ! hag e gorf kemend-all ! Al latin nag ar gregach ne blijent ket d'ezan nemeur, ha war ar galleg e oa klouar ive. Ar studi a roe

d'ezan ar muia a levenez e oa hini ar saosneg, rak o tiski, ar yez-man e kleve kelou a Vreiz-Veur, mamm-goz ar Vretoned. Eur wech krog er studi-man, ne ziskrogas diouti, na noz, na deiz, ken ma voe barrek da lenn, en o hed, oberou ar barz Shakspeare.

— « Rak, emean, me a zeblante d'in, pa
« lennen c'hoariellou ar skrivagnour-ma,
« gwelout an traou o tremen war zouar
« Breiz-Izel ha klevout moueziou anavezet
« mat o komz. Hag aboue e klevan aneze
« bepred. Breiz-Veur a c'halv ac'hanoun
« gant eur vouez ken karantezus hag hini
« va mamm Breiz-Izel. Siouaz ! harzet ez
« oun bet, epad pell amzer, da vont da
« welout ar Vamm-Enezen. »

P'arrue an eur da vont da c'hoari, Lemenik a veze c'hoaz er penn kenta, dreist-holl pa zave kann etre eur bagad skolaerien, ha kement-man a c'hoarweze alies awalc'h.

Lemenik a veze pedet neuze da gemer penn eur gostezen, an hini an distera, bep gwech. Pa veze red stourm, ne zelle nag a drenv, nag a gostez : kemer a rê penn ar stourmerien ha rei a re kalon, war e lerc'h, d'ar re a grene. Biskoaz n'en em gavas e strollad da veza trec'het. Eur wech hepen Lemenik a voe trec'het ha gant eur mestr-studi an hini a voe.

Eun dervez ma oa o konta kement-man d'e vignoned, araok kuitaat ar skolach, unan aneze a lavaras :

— « N'ez eo ket souezus. Beza oa eun
« emglew etre da enebourien : difennet e
« oa tizout ac'hanout. »

Lemenik war e wele a varo

Hogen deut e oa e yec'hed da veza fall. Al labour, ar baourentez a boueze mui-ouz-mui war e dud, a lemme e nerz

digantan. Tam ha tam ez eas war fallaat ken e kouezas klanv fall e deizioù kenta mezeven 1871. Ar vrec'h gwadus, lazet ganti kement a Vretoned aboue eiz miz, a oa krog ennan. E-pad tri dervez e wad a redas distank. E vamm hag ar mezeg a oa en dro d'ezan, noz ha deiz, o c'hedal ar c'houlz mat da harz ouz ar red-gwad. Met ar c'houlz-se n'arrue ket ha setu ar mezeg, goude tri dervez ha goude kement a wad kollet, o lavarout d'ar vamm, distroet diwar wele ar c'hlanvour :

— « Itron gaez, setu arru eur an « diwez : den ebet, war an douar, « n'hallfe harz ar paotr yaouank-man da « vervel. Red eo d'in tec'hel, rak roet em « eus va holl skiant-prena. »

Kalon ar vamm a voe rannet. Truga-rekaat a reas, koulskoude, ar mezeg kalonek ha madeleus, hag e tiskennas gantan eus ar gampr 'lec'h ma vanas

Lemenik 'n e-unan war e wele a varo.

Eur pennadig goude, aet ar mezeg e-kuit, mamm Lemenik, ankeniet bras, a bignas er gampr ha kerkent e chomas estlammet, dilontret he daoulagad en he fenn, ha ne oa ket gant ar spont an hini e oa.

— « Petra 'zo c'hoarvezet ganit, va « mabig ker, keit ma oan e traou ? »

— « Netra ebet, mamm ».

— « Ne ziwadez ken, va bugel ! a grie « ar vamm o tostaat d'ar gwele. Va « mabig, setu te e-maez ar boan. Doue « ra vezo meulet ! »

— « Aboue m'ez oc'h pellaet gant ar « mezeg, eme Lemenik, ar gwad a zo « paouezet da vera. »

Gant petore galloud e oa bet zikouret pa oa distroet dioutan galloud an den gouiziek, pa ne oa en galloud den ebet dont d'hen yac'haat ?

Azalek ar beure-man, Lemenik en eus sevenet lod eus an diougan koz : *Sevel a raio harnezet war e wele a varo*, rak e gwi-rionez, eur miz goude, e save, yac'h grons diwar e wele, harnezet a gorf hag a spered evit mont da stourm enep ar bed e Breiz, e Bro-C'hall, ha lec'h all. Roet e oa d'ezan, kouls laret, eun eil ginivilez, hag aboue en deus stourmet, hep ehan, ouz ar bed, hep senti, hep koll nag e nerz nag e skiant.

II

AR STOURM KENTA

War c'honid e vara

Unnek miz goude e tec'has a Wengamp evit mont da vestr-studi da skolach Dinam. Oajet e oa a 17 vloa. E studi ne oa ket peurachuet, rak ouspenn eur bloavez skol en devoa c'hoaz d'ober ; met ken kriz e oa ar baourentez e ti e dud, ken e renkas mont da c'honid e vara evit dizamma eun tammig an tad hag ar vamm o devoa zavet anezan gant kement a evez.

Setu-han, eta, e-kreiz bugale da rena. Digemer mat a voe graet d'ezan gant ar re a oa dindan e veli. Bretoned e oant holl, bretoned gall, nemet unan hepken hag a

oa eur c'hrennard a Vreiz-Veur, kempennet mat e izili hag hen kalonek eus ar gwella.

Heman a ziskouezas kals a garantez d'e vestr nevez azalek an dervez kentan. Hogen e-kichen ar re-man e oa c'hoaz eul loden dindan renadurez eur mestr all. Ar re-ze e oa paotred etre pevarzek ha seitek vloa ha dre ma oa ar mestr nevez demdost ken yaouank hag int, setu e fellas gante gwa-paat anezan.

Lemenik, da gentan, ne reas van ebet dioute. Hogen eun nozvez, da eiz eur, eun tregont kanfard bennak en em vodas dirakan, hag int da huchal :

— « Kaset anezan en-dro ! »

Hag e reont van da zont da skei warnan. Lemenik, hep dalei, a gerzas warne, hag e zaouarn serret, en em lakaas en o c'hreiz :

— « Gouest oun, emean. Kaset ac'ha-
« non en-dro eta breman. »

An darn-vuia eus ar skolaerien-man a

oa a Zant-Malo pe eus an dro, mibien ofiserien-vor, holl kempennet mat ha krenv, hag en o mesk e oa daou baotr yaouank a Vreiz-Veur. Ar stourm a helle beza stard evit Lemenik.

— « Ac'hanta, emean c'hoas, barrek
« oc'h ? Hag aoun ho pefe ? »

Ger ebet. Daou baotr yaouank Breiz-Veur en em zistagaz dious ar re-all ha tam ha tam ar strolladen a bellaas. An trec'h a oa chomet gant Lemenik bihan. Ha koulskoude mestr ar baotred-ma a oa tec'het pa 'n devoa klevet ar youc'haden genta, rak ar bloa araog eur mestr all a oa bet gwall-skoet gant e skolaerien hag an aon a oa kroget en e galon.

An deiz warlerc'h d'ar beure, breizad bihan Breiz-Veur a arruas er skol evel bemdez, met herie e touge etre e zivrec'h brasa bec'h bleun lili a helle derc'hel.

— « Eun nebeut bleuniou a zigasan

« d'ec'h a liorz va mamm, eme ar c'hren-
« nard ; me ho ped d'o digemer. »

— « Oh ! eme Lemenik, bleun rouelek
« ez eo ar re-ze. Ne zigemerin ket aneze. »

— « Koulskoude, herve pezh ez oun o
« paouez klevout, roue awalc'h ez oc'h,
« eme ar pôtrig. Hogen taolet aneze mar
« ne blijont ket d'ec'h. »

Ha bep beure goude, Lemenik a wele
Breizad yaouank Breiz-Veur o tigas d'ezan
eur vriad lili.

Eun nebeut miziou goude ez eas da
vestr-studi da Roazon ha diwezatoc'h d'an
Orient ha d'an diwez da Bondi. Ha labour
vat a reas bepred en despet da bennou
tomm ar skolaerien a glaske stourm outan
evel ma raent ouz ar mestrou all araok.
An trec'h a chome gantan koulskoude, e
pep lec'h hag e pep tro.

Hogen Lemenik n'halle ket chom stag
ouz eur skolach e tu-hont da dri pe bevar

miz, rak eur c'hoant poazus en devoa da
vale Bro-C'hall ha dreist-holl da welout
Pariz. N'en devoa ken na peuc'h na leve-
nez. Trei ha dizrei a rê evel eul loen
staget. E Pondi, dreist-holl, e krogas
ennan eur glac'har ken kriz ken e kollas
ar c'houk. Eur c'hounnar divent a zavas
en e galon enep d'an holl en dro d'ezan
ha, zoken, enep d'e vamm hag enep da
Vreiz. E spered a oa evel skuit ha skarzec'h ;
met derc'hel a rê bepred gant e labour en
eur enebi ouz e c'hoant da vont da Bariz.

Allas ! eun deiz bennak, Lemenik a
bakas e dammou dillad hag a gemeras an
hent-houarn evit Pariz en eur grial ennan
e-unan :

N'euz fors petra a c'hoarvezo,
Pez a dle beza a vezo.

Stourmou ha paourentez bepred

Setu tro an dienez hag ar baourentez ru. Koulskoude e spered hag e galon a gavas raktal peuc'h ha levez.

Meur a wech, aboue, ez eus deut sonj d'ezan e oa bet kinniget d'ezan, e Bro-C'hall, stadou eus ar re wella, hag en devoa nac'h et digemer dre c'hoant da chom e Breiz. Arru oa an eur da baea e garantez-vro.

Gwall-skant e oa e yalc'h. E dud a oa breman ken paour ken n'halle goulenn skouarn ebet ken digante ha pa 'n dije bet c'hoant d'hen ober.

Anavezout a rê e Pariz daou den a stad izel, hogen re uhel e oa e spered evit mont da ziskleria d'eze e boan. Beza en devoa eur c'hefiad dillad : ac'hanta gwerza a raje kef ha dillad mar ne gavche netra well d'ober.

Seblantout a reas d'ezan e anaveze ar Ger-Veur a viskoaz, tud ha tier. Ha setu han da redek evit 'n em ginnig eus an eil skol d'eben.

— « N'hallan ket kemer ac'hanoc'h, a « veze respontet e pep tu. »

War-benn eun nebeut deiziou, setu deut e yalc'h da veza ken kleuz, ken ne grede ken prena bara. Azalek neuze e vagadurez a voe dour feunteun. Pa n'hallas ken paea e gampr, e renkas tremen an nozveziou war vale dre Baris. Mad 'oa kavout diouhar krenv. Tremen a reas eil hanter miz mae o vale hep ehan ; an darnvuia eus e brejou a voe skudelladigou dour. Met peza oa souezus, e spered a oa en peuc'h, hag e galon 'oa en he flomm ! zo kaeroc'h, pa sonje en e stad tremenet e Breiz-Izel, e kave gwelloc'h e stad nevez. Ne zonje tamm en e dud, nag en den all ; digemer mat a rê d'e baourentez hep goulenn digan-

tan e-unan penaoz harz outi na penaoz e teuje d'hen kuitaat. Laouen ne oa ket, met en peuc'h e oa da vihana.

Penaoz n'ez eo ket marvet gant an naon hag ar skuidzer ? Den n'hen goar. Red mat e voe d'ezan, e gwirionez, beza bet harnezet, rak eun taer zun bennak e chomas war vale, bevet gant dour nemet pa zigoueze gantan kavout eur c'henvroad a Wengamp war e hent hag a ranne gantan loden eus e bred.

Brevet gant ar skuidzer, draillet e votou, louz e zillad, ne seblante ket beza gouest da gaout eur stad. Ne chome gantan nemet eun esper : beza skoazellet gant ar galloud kuzet en devoa roet sikour d'ezan war e wele a varo.

Hogen d'an oad-se Lemenik a oa pell dioutan sonjal en diouganou Marzin pe en diouganou-all. An hano a Lemenik, dibabet gantan kalz diwezatoc'h, ne oa ket,

zoken, en e spered. Ne oueze netra diwar-benn ar galloudou a zo 'us d'imp, hag a gase anezan en-dro hep gouzout d'ezan.

Eur beure bennak koulskoude, e c'hoantaas mont d'ober eun dro da di eur c'hlasker plasou. Menel a reas batet : beza e oa eul lec'h evitan en eun ti-skol 'lec'h ma kelened bugale hanter-diot. An eurvad-man a zigouezas gantan e deizioù kenta mezeven. Setu-han da redeg ! Raktal ma voe dirak mestr bras ar skol, a voe digemeret, daoust d'e stum a baourentez ru. Ne chomas ket pell eno, 'mesk ar 'vugale baour-man hag o mistri, kaer en devoa beza kroget mat gant e labour adarre, mestr war e runkun ha gouest d'ober gant an holl herve ar gwella ; met ne oa ket ezom dioutan pelloc'h.

Ha setu red, goudé eur miz hepken, mont adarre da gaout ar feunteuniou ha da gregi gant ar baleadennou, rak nebeut a arc'hant

a oa bet da rei d'ezan pa guitaas ar skol ha kavout eur stad-all, e miz gouere, a oa e maez ar gont.

Taer zun bennak e chomas adarre da frita mizer gant paourentez. Er mare-man oa miret d'ezan anavezout pezh a oa bet pellaet dioutan bete vremen.

N'ez eus ken da ziskenn

Eun nozvez, war-dro hanter-noz, en em gavas da zihuni, dindan pao eur gward-kaer, war bazennou c'hoariva an Ambigu. Penaoz e oa arruet eno ? penaoz e oa kroget ar c'housked ennan ? N'en devoa koun ebet ken. Ar gward ne roas ket amzer d'ezan da glask :

— « Heuillet ac'hanoun, emean. »

Ha setu ar paotr yaouank o kerzet a-drenv ar gward, skuisoc'h eget biskoaz hag o sonjal, a-hed ar ruio :

— « Me a grede n'hallen ken anavezout
« brasoc'h poaniou. Allas ! Setu me etre
« daouarn ar polis. Gwasa mez a c'hortoz
« ac'hanoun breman ! Petra c'hoarvezo
« ac'hanoun ? »

Ar gward a zigoras dor ar c'homiser ha Lemenik en em gavas dirak an den-man, red d'ezan displega doareou e vuez.

— « N'hoc'h eus lojeiz ebet e Paris ? eme
« ar c'homiser ? »

— « Oh ! salokroaz ! eme Lemenik, beza
« am eus. An aotrou Hen-ha-hen a lavaro
« d'ac'h am eus eur gwele en e di ».

— « Gwelet e vezo. Da c'hortoz, c'houi
« a dremenno an nozvez aman. »

Ha setu Lemenik boutet en eun toull du lec'h ma oa eun nebeut paotred das-tumet eveltan gant ar gwardou. Hennez a oa eun toull a boan hag a vez, rak eno ne oa ket hepken peorien : beza e oa ive laeron, muntreien, ha falla tud a zo war

an douar. E gwirionez, ne oa ket brao-beza mesket gante. Peadra e oa da goll ar skiant.

Digouezet e oa d'ezan gwelout an dud-man e-pad e valeadennoù noz a-hed ar ster, pe er c'hoc'hu bras pe 'n eul lec'h all bennak, 'lec'h ma 'n em denne an holl valeerien hep ti eveltan, da gousket eun daken. Hogen mar helle heuil e hent neuze, setu breman e oa staget oute. Anavezout a reas eno kriza anken a hall gouzanv an den fur.

C'hoarzet en deus aboue o sonjal en e walleuriou, met ne c'hoarzas ket en noz-se. Koulskoude ne gollas ket e skiant. E galon dalc'hmat a zo savet uhelloc'h eget ar boan.

P'arruas ar c'houls da veza didoullet ha da veza kaset dirak ar c'homiser adarre, ne oa anken ebet ken en e spered, ha ne oa ket a lec'h da gaout anken e gwirionez.

— « Gallout a ret tec'hel, eme ar c'ho-
« miser. Gouzout a ran ez eo gwir ho
« toareou. Met diwallet mat da 'n em
« ankouaout eur wech-all da gousket er
« ruiou, rak startoc'h e vefec'h klozet,
« kredet ac'hanoun. »

Neuze e tec'has Lemenik a zindan kran-
banou ar gwardou, o sonjal 'oa bet truga-
rezus avalc'h an aotrou X... o tremen hep
hen dislavarout, rak ne oa bet biskoaz
gwele evit Lemenik e ti an aotrou-man.

— « Oh ! breman, eme Lemenik outan
« e-unan, daoust hag arru ez oun e penn
« va hent a dristidigez ? Setu gouzanvet
« ganin ar brasa poaniou. Marteze e ti-
« goulzo breman eun draig brennak a vad. »

Ne felle ket d'ezan bepred goulen
skoazel na digant e dud, re baour evit
gallout ober eun netra evitan, na digant
den all, ha setu-han krog da vale adarre,
noz-deiz, dre Bariz, hep esper ebet da

c'hallout terri e naon na da c'hallout dis-
kuiza e gorf.

Eun dervez ma oa, evel bemdez, o vont
dirakan, en em gavas, fri ouz fri, gant eur
paotr yaouank ; mab an aotrou X... an
hini e oa, hag a lavaras d'ezan :

— « Deut ganin d'ar gêr. Arru ez eus
« eul lizer evidoc'h a Wengamp. »

— « Feiz'ta ! daoust piou a hellfe skriva
« d'in ? »

— « Ho tud, eme an den yaouank. Va
« zad en deus skrivet d'eze ha me gred ez
« eus arc'hant evit kas ac'hanoc'h d'ar
« gêr. »

Gwir e oa. Eur pred mat, servijet d'ar
paour kez, d'an abardaez, a roas d'ezan
nerz ha kalon araok kemier an hent-
houarn evit mont da Wengamp.

Allaz ! stad e dud a oa ken gwaz hag e
hini. Arru 'oa ar c'houlz gante da droc'ha
al liammou a stage aneze ouz o stad-

buez gwalleurus, pe da vervel dindan ar
bec'h.

Hogen, nag an tad nag ar vamm ne
felle d'eze diskenn izelloc'h dirak o ame-
zeien. Klask a reas Lemenik an tu da enebi
ouz ar baourentez. E vamm he devoa eur
galon grenv ha ter, hep aon. Lemenik en
em glevas ganti evit dispenn pezh a chome
c'hoaz eus an ti koz hag evit sevel, gant
an dismantrou, eun ti nevez, bihan ha
dister, mentet hepken diouz o stad.

Ha setu ar vamm galonek o tiskenn eun
nebeut pazennou evit beva eur vuez diste-
roc'h c'hoaz, hep koll he nerz kalon, seder
bepred.

Lemenik, eus e du, a gavas e Bro-C'hall
eur skol nevez evit gonid e vuez, e Roche-
fort-war-Vor. Red eo lavarout koulskoude
ne oa ket troet e c'hoant etreze ar gêr-
man. Aboue ma oa aet d'an Orient, eur
voez a ziabarz a lavare d'ezan :

— « Da skolach Chaptal ez i da vestr-studi. »

Hogen daoust d'ezan beza 'n em gavet awechou, en eur dremen e Pariz, dirak dor ar skolach-ma, eun dra bennak a harze outan mont da c'houlén beza digemeret ennan.

Mamm Lemenik

Red-mat ez eo breman komz eun tammig eus mamm Lemenik. Ganet er Brugou, e parrez Grass, savet e oa bet er vrasa furnez. Ar zul ez ae da vale gant eun amezegez eus he oad, ganet evelti er bloavez 1818. Houma oa eur penn-skanv hag a yê war-raok, hec'h-unan, pa ne blijé ket gant merc'h'ar Brugou mont ganti.

Eur zul eta, goude kreiste, an amezegez 'arruas er Brugou.

— « Klev 'ta, Katrinn' ar Barz, emezi,

« eun dra bennak am eus da lavarout d'it. »

— « Lavar, mar deo mat klevout. »

— « Mah ! ober a rin, herve da c'hoant.

« Disul diveza ez oun bet o welet sorserez

« Pabu. Ne gredi ket pezh he deuz lavaret

« d'in diwar da benn ».

— « Petra 'ta a c'hall lavarout diwar-
« noun ? »

— « Setu aman he c'homzou : Lavar da

« Gatrin ar Barz am eus traou eus ar c'henta

« pouez da ziskleria d'ezi, hag ez eo red

« d'ezi dont d'o c'hlevout disul genta goude

« kreiste. »

— « Fellout a ra d'ezi eta lavarout d'in-

« me va flaneden ? N'ez eus ezom ebet. »

— « Koulskoude mar az pije gwelet he

« dremm e pad ma komze, e kavjez ez

« eus ezom. »

Kement ha kement a reas ar plac'h yaouank ken e redas an diou vignounez bete ti sorserez Pabu. Arru en ti pri 'lec'h ma

chome houman, setu ar wrac'h da grial :

— « Ac'han ! setu te deut da glevout da
« blaneden, Katrin ar Barz. Diskennet eo
« da lorc'h eta : diskenn a raio c'hoaz
« izelloc'h. Selaou ac'hanoun, merc'hig, ha
« te a welo n'em eus ket distroet ac'ha-
« noud diwar da blijadur evit netra :

« Koant evel ma 'z oud, ha faro evel ma
« plij d'it beza, e c'heller kredi e timezi
« abred. Ne ri ket, koulskoude. Da bried a
« vezo eun intanv, eun tiad bugale d'ezan.
« Te da-unan az pezo kalz a vugale ; hogen
« gwelout a ri aneze holl o vervel, nemet
« unan pe zaou. Amzer genta da briedelez
« a vezo evidout an hini wella. Mont a ri
« goude, a eneb da c'hoant, pell-pell diouz
« da gerent. Ha neuze te a vezo dindan
« gwalen ar reuz. Oh ! te a stourmo, rak
« beza 'c'heus eur galon grenv. Paour e
« vezi pa zeuio ganit dont war da giz
« e-kreiz da dud, ha paouroc'h e vezi

« c'hoaz goude, rak pa vezo deut a gozni,
« e kuitañ da vro evit mont pell da guzat
« da zienez. Pa 'z pezo gouzanvet holl
« boaniou ar bed, e tostañ d'az pro da ver-
« vel, ha da gorf a vezo beredet e parrez
« Grass. Hogen eur pennad araok da varo,
« eur prinz a zeuio da welout ac'hanoud.
« Kerz breman, ha dalc'h sonj eus ar pez
« a lavaras d'it sorserez Pabu. »

Diwez ar poaniou

Achu ar bloavez skol e Rochefort, Lemenik a dostaas da Bariz. E kêr Blois e tremenas ar bloa war-lerc'h. Ar gwalleur a skoas neuze gant kement a herr war e dud ken e renkchont, tad ha mamm, mont pep-hini en e du. Ar vamm a yeas da Bariz gant he mibien ; an tad a voe digemeret gant e vab beleg.

Lemenik e-pad an amzer-se a glasse tu.

da vont da gaout e vamm da Bariz. Arru miz eost, setu-han o kuitaat Blois, poun-neroc'h eged biskoaz ar zamm war e zious-koaz.

Bete miz du e tremenas e amzer e Pariz o tiluzia meur a dra evit heman ha hennez, paeet nebeut. Hogen ar vouez a lavaras c'hoaz :

— « Mont a ri da skolach Chaptal. »

Hag hen o vont da welout ar rener evit en em ginnig evel mestr-studi. Met dre ne oa ket bet peurachueta e studi, ar rener a lavaras d'ezan :

— « Gortozet. Sellout a rin ouz kement-man. »

Paperou ar paotr yaouank a oa eus ar re wella, ha setu, an deiz war-lerc'h, e voe galvet da zont da gregi gant e labour.

Ar vouez n'he devoa ket faziet Lemenik.

Tremen dek vloa e chomas Lemenik e skolach Chaptal ha pa hen kuitaas e voe

evit mont evel skrivagner e Ti-Kêr Pariz. Met aman, kouls hag e skolach Chaptal, kaer en deus bet poania, eun nerz didrec'hus a stagas anezan ouz eur stad izel.

Maro e Vamm

Hogen distaget en devoa e vamm diouz he stad c'haro, en servich ar re-all. Savet en devoa eviti eun tiegez nevez ha setu Katrin ar Barz o welout diwez he foaniou, ar poaniou diouganet d'ezi gant sorserez. Pabu. Met bepred a c'houlenne digant he mab :

— « Pegouls e kasi ac'hanoun da C'hrass. »

Er bloa 1889, Lemenik a roas d'ezi ar blijadur-se.

Pegen laouen e voe ar vamm, daoust d'ezi sonjal alies en diouganou ar wrac'h ! Arru e Grass, e-touez he c'herent, e kouezas he nerz tamm ha tamm. Pa 'z ae Lemenik

da welout anezi, bep gwech e kleve ar goulen-man :

— « Breman e c'hortozan ar prinz a dle
« dont da welout ac'hanoun. Pa 'z eo bet
« sevenet an diouganou all, ar peurrest
« aneze a vezo sevenet ive. A belec'h e
« teuio ar prinz ? Petra 'n eus da lavarout
« d'in ? Petra e kredez-te va mab ? »

Lemenik a rê eus e wella evit distrei
spered e vamm diwar ar prinz-se, met ne
deue ket a benn d'hen ober.

Hen e-unan ne grede ket nac'h ouz e
vamm donedigez ar prinz pegwir e oa ken
skler diouganou all ar wrac'h.

Eur sadorn vintin a vezeven 1891,
Lemenik a zigemeras, e Paris, eul lizer
hag a gemenne d'ezan e oa maro e vamm.
An deiz war-lerc'h e oa e Grass e-kichen
ar c'horf kêz, gouzanvet gantan kement
ha kement a boaniou er bed-man, ar c'horf
e vervas ennan eur galon ken krenv ha

ken joaüs, a gemere ar boaniou-se evel
gonidigeziou, pegwir, e-kreiz ar re vrasa,
e kleve Lemenik e vamm o lavarout :

— « Pa n'hallan trec'hi war ar reuz, me
« a ra fae outan. »

Ha seblantout a rê d'ar mab tener
klevout ar vouez kêz o lavarout d'ezan eur
wech ouspenn :

— « Sav da galon, va mab, ha 'n em
« difenn ouz an daerou. Te ez eo Yann
« Montfort, te 'oar ze, Yann Montfort a
« Istor Breiz. »

Ha neuze e teue da sonj da Lemenik he
devoa tremenet he bloaveziou diweza o
lenn Hanes Breiz-Izel ha hini Breiz-Veur,
ha penaoz, du-hont, e Pariz, ec'h ankoueze
hec'h amzer fall o vrezonegi diwar-benn
rouane ha duked Breiz. Ha bepred e teue
war he diweuz ar ger :

— « Te ez eo Yann Montfort, va mab.
« Dalc'hmat da serviji Breiz-Izel. »



Douaret e oe Katrinn ar Barz e bered Grass, dindan bannou eun heol klouar, ha dindan eun oabl digoumoul. An daerou a zivere a zaoulagad Lemenik en eur sonjal pegen kriz e oa bet ar vuez eviti.

Distroet da di ar genitervez he devoa evesiet e vamm e-pad diweza miziou he buez, e c'houlennas ha prinz ebet ne oa deut da welout e vamm.

— « N'ez eus deut a-bell nemedoc'h. »

Ha Lemenik a reas eul lamm war e gador, met ne lavaras ger. Neuze 'ta, hen e-unan e oa ar prinz !

III

BUEZ NEVEZ

Lemenik den a bluen

Raktal ma voe digouezet Lemenik e Pariz, evit en eil gwech, e kavas er gwella digemer e-touez ar skrivagnourien, daoust d'ezan beza Breizad. Koulskoude, evel m'eman kont gant an holl C'hallaoued, ar re-man ne oant ket troet mat gant ar Vreiziz. Ar republikaned a felle gante hag a fell gante c'hoaz sellout tud Breiz evel sperejou divalo, sachet dalc'hmat war a-drenv ha penfollet gant eur garantez diboell evit rouelez ar Franz. Kaer en devoa Lemenik displega ar wirionez dirak o daoulagad, n'arrue ket da

sklerijenni o spered. Pa welas ne oa gwir ebet da c'hortoz eus ar seurt sperejou, e sonjas : « Marteze ez eo red d'ar bed beza evel-se. » Eur wech stag ouz skolach Chap-tal, en em lakaas da skriva, nec'het eun tamm o sonjal ne deujé biken a-benn da c'hallout embann e labouriou e Pariz.

Hogen ne zaleas ket pell da welout e zanevellou moulllet, paet d'ezan ha lennet gant an holl.

Galvet e voe neuze da veza, epad eun toullad bloaveziou, sekretour ar *Magasin pittoresque*.

Aezet e vije bet d'ezan beva gant e bluen mar ne vije ket bet gwelloc'h gantan derc'hel gant e genta micher, rak ne oa ket a lorc'h ennan 'vel ma 'z eus en darvuia euz ar skrivagnourien. Koulskoude en devoa plijadur o welout e save dioustu e kichen hag e renk ar re o devoa graet d'ezan digemer mat. Met n'en devoa nemet berr amzer da rei d'al lizeradur ; n'ez eo nemet a bell-da-

bell e c'helle diskleria eun dra bennak er c'helaouennou.

Hogen an holl dorojou a oa digor frank dirakan. Ar vuez a zeblante gwellaat.

Setu-han eta mesket gant ar bed. Sellout a rê en-dro d'ezan gant daoulagad lemm. Klask a rê gouzout petra 'oa e spered tud Pariz ha dindan o sevenidigez. E deod 'oa ken lemm hag e zaoulagad, hag abred en em ziskouezas gouest da c'hoari dre gomz 'mesk an dud. N'ez eus bet den helavaroc'h eget Lemenik.

Goude eun nebeut bloaveziou tremenet oc'h ober anaoudegez gant ar Gêr-Veur, e seblantas d'ezan e oa diou loden etre e vignoned : an eil re hag ar re-all a felle d'eze sacha anezan d'o zu, paka anezan, hag en em serviji dioutan. Ne reas van ebet. Pa wele eun dorn bennak o sevel warnan eur c'habestr hag eur c'habestr alaouret e vije, Lemenik a vreskenne raktal, rak chom digabestr

a felle d'ezan, na pa vije red menel paour. Azalek ma c'honee bara, ne c'hoantae ket kaout druzoni warnan. Hag eur stourm nevez 'n em veske, er c'hiz-se, gant e vuez.

Souezet e oa gant eun dra. An dud yaouank a bep oad, a oa en-dro d'ezan, ne gomzent nemet eus o skoazellourien. Heman en devoa bet eur stad vat gant skoazell an Ao. Hen-ha-hen ; eun all a oa digemeret skrivagnour en eur gelaouen vras dre c'hras en Ao. pe an I. Taerstereden ; egile a oa deut eur gonid all d'ezan gant skoazell eur den bras all benak.

— « Ha me n'am eus skoazel ebet, a
« zonje Lemenik. En tu-hont da ze, paour
« ha dister ez oun ; va mamm a zo bre-
« man o serviji hag ez an, va-unan, da
« ginnig oberou va spered. Digemeret oun
« koulskoude gant kement a evez hag ar
« baotred yaouank a zo pinvidik ha paerou-
« niet. Perak-se ? Me oar awalc'h n'ez eo

« ket va zalvoudegez a ro d'in an
« se. A belec'h eta e teu heman d'in, e
« pa vefe eur prinz kuzet bennak o vlenia
« va buez ? »

Ya, bleniet e oa e vuez, e gwirionez !
Pep tra a veze eünet gant evez evit rei
d'ezan, eus eun tu, bara herve e ezom, hag
eus eun tu-all brud vat, brud eun den
yaouank a dalvoudegez. E c'honidegez a oa
mentet d'ezan gant e skoazellour kuzet evit
mirout outan da zevel d'eur stad lorc'hus.
Nag a wech ez eus digouezet gantan beza
tost da vedi frouez e labour, meulet gant
an holl, ha gwelout, d'an divez, ar frouez-
man o teuzi en e zaouarn.

E-pad e vuez, koulz laret, kement gwech
en deus labouret evitan e-unan, an dra-ze
a zo c'hoarvezet gantan. Keit m'a 'z eo bet
chomet e skolach Chaptal, da lavarout
eo dek vloa, keit ma 'z eo bet chomet e
Ti-Kêr Paris, da lavarout eo ugent vloa, ez

eo bet dalc'het en eur stad izel, kaer en eus beza bet diskouezet e oa gouest, dre e ouiziegezh, dre e skiant, da zevel d'an uhella stad. Enebour ebet koulskoude ne zavas dirakan.

— « Va gwir am eus bet, emean, pa 'm
« eus bet va loden a boan hag a eurvad.
« Perak goulenn ouspenn ? »

Skriva 'rê eta bepred evit ar c'helaouennou hag ar c'helaouennou-kelc'h. Danevellou koant a zivere, gwech an amzer, diouz e bluen ampart, hag ive skridou talvoudus war an ijinou-kaer. Ha derc'hel a rê gant e ziu vicher.

Hogen biskoaz ne c'hoantaas ober eun dastumaden eus e oberou. Ha setu perak ez eo red klask aneze du-man ha duhont e-touez berniou paper al Levrgell Vroadel.

War-dro e bemp bloa ha daou-ugent e tiguezas gantan digemer kinnigou talvou-

dus a-beurz skrivagnourien kelaouennou Pariz.

— « Ac'hanta, emean, daoust ha skuiza
« raio ar baourentez da zerc'hel ac'hanoun
« en hevelep stad ? »

Etre beui ha neu

Ya, hen derc'hel a reas ! rak arru e oa evit Lemenik ar c'houlz da bae al labour graet gantan noz ha deiz aboue e eil diskenn e Paris, pemp bloa warn-ugent a oa. E yec'hed a oa faez dindan ar bec'h. Ne gouezas klenved ebet warnan, met e nerz a oa lemmet digantan. Red ez eo ive lavarout ne oa bet biskoaz en e benn kement a vennoziou kaer diwar-benn Breiz, ar Gelted hag ar Barzaz. Eur vuez nevez, kouls lavarout, a vevas diwar neuze.

Paour e oa, e gwirionez, met paour hep dienez. Evit diskuiza e oa red mat d'ezan

leuskel eur vicher : diou a oa unan a re. Teurel a reas e bluen a gostez, gant furnez evit mirout e stad en Ti-Kêr. Ha setu penaoz, eur wech ouspenn, e voe harzet da vedi e bark goude beza labourer anezan euz ar gwella, hep ehan, ha beza laket ennan gwella had e spered hag e galon.

Hogen Breiz a vezo well breman eus mennoziou kaer e spered. Gwelet ez eus penaoz e talc'he d'e vrezonég pa oa o chom gant e vamm, ha penaoz e veze alies meneg etreze eus ar vamm-vro garet.

E wella skridou a voe graet evit difenn e vro hag e ouenn dirak an holl, hag evit sevel aneze dreist d'ar re-all. Diskouez a reas en devoa lemmet mat e zent ouz dero Bro-C'hall. Den ne drec'he warnan na dre gomz, na dre skrid pa stourme evit e vamm-vro.

Planedennou

Meur a wech en em gavas Lemenik e bodadennou tud vras 'lec'h ma vije itro-nezed hag a felle d'eze lenn ar blanedenn e dorn pep-hini, pe 'n eur c'hiz all. Lennet e vije d'ezan e hini evel d'ar re-all. Hogen an holl blanedennou a ziougane d'ezan kement-man : « Beza ez pezo eur mignon e touez brasa tud Pariz, hag a garo ac'ha-noc'h dreist-oll ; hennez a zo pinvidik ha gwisket eo gant dillad alaouret an dud en karg. Dimezi a refet gant eun dimezel hag he deus melena bleo a zo e Pariz... »

Eur wech e c'houlennas digant unan :

— « Perak ne lennet ket va flanedenn
« penn-da benn ? »

— « Abalamour, emezi, ne vez ket
« lennet d'an dud peza zo re gaer, pe peza
« a zo re griz. Arabad eo pennfolli aneze.
« Difennet eo. »

Koulskoude, pell amzer goude, unan a zisplegas d'ezan e blandeden war hec'h hed.

— « Oh ! emezi, biskoaz kement all !

« Eur blandeden dispar ez eo hoc'h hini.

« Ken kaer evel m'az eo, ne gredan ket

« lenn anezi d'ec'h araok beza klevet ali
« eur vignonez am eus. »

Hogen eun nebeut deizioù goude e lavaras da Lemenik :

— « Biskoaz n'ez eus bet gwelet plane-
« den kaeroc'h eget hoc'h hini. En tu-all
« e man d'ar binvidigez ha zoken d'ar
« rouelez. Piou oc'h eta ? »

— « Piou ? eme Lemenik, eur paour
« kêz den, labouret gantan eus e wella hep
« gallout tenna frouez eus e labour. »

Koulskoude graet en devoa an dimezi a oa bet diouganet d'ezan. Kaout a reas, eun deiz, eun dimezel a vleo melen, merc'h al liver brudet Edouard Krug, livez, hi hec'h-unan, a skol he zad, hag

a asantas dont da veza bretonez o timezi gantan.

E-touez mignoned kerent an dizemel-man e oa tud hag e c'heller lavarout dioute e oant tud vras. Unan aneze, an hini kosa, an Ao. Charles-Louis Muller, daouzek vloa ha tri-ugent, a blijas Lemenik d'ezan hag e karas anezan evel eur mab. Red ez eo d'in lavarout aman e oa Lemenik eun den kaer, eur « gentleman » eus an dibab, eun den hag a oueze en em derc'hel dre-holl, komz d'ar c'houlz, tevel pa veze-mad, ha komz bepred gant spered. Biskoaz den n'eo bet sellet gant muioc'h a zoujans-na selaouet gant kement a blijadur. An Ao. Ch.-L. Muller a oa ive eul liver hag unan eus ar re vrudeta, ezel eus Institut Bro-C'hall.

Ha setu planeden Lemenik sevenet adarre, war daou boent da vihana.

Petra a zigouezfe gant ar poenchou all ;

bet kuzet outan pell ha diskleriet d'an diwez
ne oa ket pell ?

Tri bloa goude, an diouganerez a lavaras
d'ezan :

— « Gouzout a ran breman ez oc'h bet
« kaset war an douar da veza pezh ez eo bet
« Arzur ha Marzin. »

— « Chegon 'ta ! eme Lemenik, dis-
« kredik c'hoaz war dalvoudegezh ar blane-
« den-ze. Chegon ! Setu aze eun taol ! »

— « Ya, emezi, ha labour az pezo kement
« ha ma hellfet ober evit lakaat urz e
« Breiz-Izel hag er broiou all. Aboue pell
« amzer eman an dud o c'houlenn eur Zalver.
« C'houi an hini eo, nag e vefe enep d'ho
« youl. »

Hag an itron-man a gomze ken krenv
hag e vamm pa lavare : « Te 'ez eo Yann
Montfort », ha ken krenv ha Katel Goelo
pa lavare : « Te a vezo eskob d'an nebeuta. »

E gwirionez, aboue ma oa bihan, Leme-

nik en devoa kustumet gwelout en e vuez
traou souezus evel-hen, kement ha ken
allies, ken ne rê ken van dioute. Hogen,
dre ne oa an itron-man na Bretonez, na
kar d'ezan, ha dre ma oa eur spered uhel,
mar bez, Lemenik a voe estlammet :

— « Petra a venn eta kement-man ?
« Perag aboue m'ez oun er bed am eus.
« gwelet endro d'in traou dreist-ordinal ?
« Perag em eus kavet, en tu-hont d'an
« diouganerezed, kement a dud a skiant
« hag a lavaras d'in diwall beza diskaret
« gant ar gwallleur hag e arruche ganin eur
« maread oberou bras hag uhel. Perag an
« dra-man ? perag an dra-hont ? »

Setu pezh a zo gwir : Lemenik a oa bet
ken flemmet gant digouezioù ar vuez ken
ne grede ket e c'hellje biken kaout eur
blaneden uhelloc'h ; kaset en devoa emaez
e spered, pell a oa, ar spi da veza eun deiz
den pinvidik ha galloudus, den enoret,

gant an dud, muioc'h eget ne oa dleet d'e honestiz. Ne lakae ket eta kalz a fizians en diouganou. Tevel a rê, zoken, war gement-man, nemet eur wech bennak pa 'n em gave gant eur Breizad mat e lavare d'ezan 'n eur c'hoarzin :

— « Setu aze da betra en deus talvezet
« d'in kaout eur blaneden ken kaer : arruet
« ez oun da c'honid va bara hepken. »

Hogen dre forz gwelout an dud en-dro d'ezan, tud a bep stad, paotred ha merc'hed, o sellout anezan evel eun den a-us d'e stad, hag o c'hortoz eus e beurz oberou dispar, dre forz gwelout zoken al loened, int o-unan, oc'h ober enor bras d'ezan ; dre forz ive anaout skler mat e plee gant e vuez (pe dre c'hrad vat, pe dre c'hrad fall) ar gal-loudou a zo 'us d'ar bed, Lemenik a voe red mat d'ezan beza war e evez dirak ar burzudou-man.

Kavet e vezo aman eun nebeut doareou

eus e vuez, kontet gantan d'eur c'heveil bennak. Marteze ne guzas netra, marteze e reas ive. Hogen evit pezh a zell ouz diouganou Marzin, pe ouz re-all, ez eo aezet gwelout ez int bet sevenet en-dro d'ezan. Ganet ez eo e-kreiz Breiz, e kêrig Ros-tren ; aet ez eo bet da Vro-Chall da dremen eul loden vras eus e vuez ha da stourm pe da lemma e zent ; arru 'oa gwenn e vleoa araok ma krogas gant e oberou kaer ; chou-met ez eo paour nemet, koulskoude, e-pad eur mare berr, bet gantan peadra awalc'h da zigemer en e di ar Vretoned a zeue da Bariz da zaludi anezan, da domma o c'halon ouz e hini, ha da entana o spered ouz e spered.

Ha n'ez eo ket 'ta sevenet an diouganou ? Kerzet a ra breman ar c'hirri hep lezeg ; kleuzet ez eo Paris evel eur goloen wenan. An nep a zo emskiantek ha sklerijennet, a wel skler awalc'h ez eus eun amzer nevez o tigeri.

Daoust ha n'ez eo ket bet Lemenik an hini a voe laket da gemenn troidel an traou hag an urz nevez ? Na beza ez eo ? Na beza n'ez eo ket ? Va c'hreden a zo d'in war gement-man ; hoc'h hini a zo d'ec'h.

Hogen pezh a hellan lavarout ez eo kement-man : Ne gredan ket e vefe kavet eun den sevenet gantan, kouls ha gant Lemenik, an diouganou ; eun den hag en deus bet kement a emskiant keltiek ha barzek ; eun den hag en deus bet kement a lealded, kement a galon, kement a spered, laket holl e servich e ouenn. Kement-se a zo awalc'h evit rei d'in an aotreadur da embann al levrig-man.

Pa vezo lennet pezh a zo war-lerc'h, mar-teze en em gavo, kouls e Breiz-Veur hag e Breiz-Izel, meur a hini a hevelep mennoz ganin. Gwelet e vezo hepdale hag hen ez eo ar mennoz-se hini ar sperejou uhel a zo o vlenia ar bed dindan beli an Holl-C'halloudeg.

II

Ar Galon

— Petra ez eo ar Barz ?

— Eur C'helt emskiantek ha galvet.

LEMENIK.

IV

LEMENIK ha BREIZ-IZEL

Chom a raio kuzet an digouezioù didest
a zo tremenet e buez Lemenik. Hogen ar
re o deus bet testou, ez eo arabad o mirout
kuzet. Darn eus an digouezioù-man o deus
bet meur a dest.

Lavaret ez eus bet el levrig-man penaoz
Lemenik n'ankounac'he ket e vamm Breiz;
penaoz n'en devoa mennoz all ebet ken
birvidik. Labourat a rê, herda m'halle, evit
anaout doare e ouenn-dud azalek amzer ar
ragistorvez bete hon amzer-ni ; ar greden
goz, al lezennou, ar c'hustumou ha pep tra
a zo mat da sklerijenni ar spered war
zoareou Breiziz.

Me a zo test ez eo bet skoazellet kaer en e studi gant an diskleriaden-ma : Ar Vretoned a zo bet laket gant an Tad Holl-C'halloudek, kouls war zouar Breiz-Veur ha war zouar Breiz-Izel evit beza, da virviken, skoazellourien ar poblou-all, evit beza o blenierien war hent ar Gwelladur denel, evit beza kelenourien ar sperejou war anaoudegez ar Wirionez.

Gwech ha gwech all, aboue 1881, e tigoueze gantan mont da welout e gerent e Breiz. Holl e oant kouerien, tud diwar ar maez ; ha laouen en em gave en o mesk. Brezonega, mont ha dont dre ar parkeier, evel ma rê en e vugaleach ; tremen er pardonioù ; komz gant ar vederien, an dornerien ; heul ar guden bep sul, gant an dud yaouank, en-dro d'ar chapel, setu pelec'h e oa e blijadur vrasa. Skrivet en deus meur a danevel gaer goude beza bevet evel-se e-touez ar gouerien.

Lemenik diouganer

Eun hanter-vreur d'ezan a oa person e Ploulec'h, e-kichen Lanhuon. Heman a gare kaout Lemenik en e di, ha Lemenik a gare ive beva eun nebeut deizioù e parrez e vreur, rak eno e kave ar mor bras hag ar vordeidi, tud hag a blije d'ezan darempredi gante, dre ma 'z int tud eun hag a galon zigor.

Eur bloavez eta, deut herve e gustum, da welout e vreur, ec'h arruas gantan digouezioù souezus.

Eun noz a viz eost, goude koan, an amzer en em gave ken skler ken e c'hoantaas gant ar person mont d'ober eun dro vale war an henchou. Tana a reas e gorn. Lemenik a rollas eun ibil-butun, hag int er-maez. Ar stered a lugerne en oabl, hag ar mor a drouze du-hont, gant eur vouez divent ; ar peuc'h a valec sioul dre ar

parkou ; an aer a oa materiet gant c'houez-
vat ar vamm-gamill.

Ar beleg kêz en devoa eur sonj. Eur
wech aet emaez ar vourc'h, hend a lavarout
da Lemenik :

— « Brao eo an oabl hag an douar
« heno. Oberou kaer ez int. Pehini eo da
« vennoz war grouidigez ar bed ? »

— « Oh ! hola ! eme Lemenik, daoust
« ha c'hoant az pefe da govesaat ac'hanoun ?

— « N'em euz ket da ! eme ar person ;
« met me gred ez teus eun dra bennak da
« lavarout d'in ha n'ez eo ket henvel ouz
va c'hreden-me. »

— « Te 'ya da glevout eta, rak n'em
« eus netra da guzat. Selaou ac'hanoun da
« vad neuze. »

— « Ober a ran, eme ar beleg. »

— « Ma ! kredi 'ran ez eo birvidik ar
« vuez dre-holl en envou hag er pell-vedou
« evel an heol, an douar, al loar hag ar

« stered a zo o vale dre ar bed divent. War
« c'horre an douar, daoulagad an holl a
« wel awalc'h ar vervaden-ze a laka an ed da
« hegina ha da zarewi, an delliou da zifluka
« war ar gwez, ar frouez d'en em stuma,
« ha dreist-holl al loened da gaout eur vuez
« impliet ken kaer gante. Hogen dindan
« c'horre bevus an douar ez eus kemend-
« all a vuez ; er mein, int o-unan, eman
« ar vuez kouls hag en hon izili. N'hallfe
« den kaout eul lec'hig da dremen ennan bek
« eur spillen hep kaout buez o virvi. » (1)

— « Hag an hent-man, ken kalet dindan
« hon zreid, na bervus ez eo ive ? » eme
ar person, 'n eur c'hoarzin.

— « Ya, eme Lemenik ; met kement-se
« ne welomp ket, rak hon daoulagad a zo

(1) D'ar c'houlz-man ne oa brud ebet c'hoaz
eus an diskleriadennoù gouiziek a zo bet graet
aboue hag a zo breman, kouls laret, artiklou a
feiz evit ar ouizieien (da heul kavidigez ar
« Radium » dreist-oll).

« bet roet d'imp evit serviji hon ezommou,
 « ha netra ken. Koulskoude, gwech ha
 « gwech-all, e welomp en dro d'imp di-
 « goueziou hag a ro da c'houzout ez eus,
 « e-kreiz an douar, eur vervaden divent.
 « War galz a veneziou ez eus toullou, darn
 « stouvet, darn distouv, hag ar re-man a
 « daol en aer tan ha moged, ha mein,
 « distaget a greiz an douar. Hag eürus ar
 « broiou o deus toullou tan da rei digor
 « d'ar vervaden isdouarek. E Breiz n'ez
 « eus hini, ha mar arrufe d'ar vervaden
 « dastum hec'h holl galloud dindan douar
 « hor bro, gorre Breiz a lamfe d'an nenv ;
 « pe c'hoaz e c'hallfe an douar 'n em
 « faouta ha digeri toullou bras elec'h ma
 « kouezfe tud ha loened, tier ha gwez. Ha
 « dre-ze an hent-man ma valeomp warnan
 « breman dizoursi, a hellfe 'n em ranna
 « dindan hon z Reid ha lonka ac'hanomp
 « evel eul loañad souben. »

— « Feiz ! Vat ! eme ar person, n'ez eo
 « ket brao da greden. »

— « Beza ez eo, eme Lemenik, rak pe
 « a lavaran d'id breman n'ez eo nemet eul
 « lodennig dioute. »

— « Ma ! diskleria a ri d'in ar peur-rest
 « eur wech-all ».

— « Evel ma kari ».

Ar person ne laras ger ouspenn : batet
 e oa. Hag e tistrojont o daou d'ar gêr en
 eur sonjal.

An deiz war-lec'h, da eiz eur vintin,
 goude e oferen, ar person a zeuas da leina
 gant eun tam bara segal, eun tam 'kig sall
 hag eur werennad jistr.

Lemenik a c'hortoze anezan. Ha setu int
 da gomz diwar-benn an amzer a rê.

Ar person koulskoude a daole sellou a-
 dreuz war e vreur. N'ankounac'he ket ar
 gêzeaden o devoa graet an deiz diaraok da
 noz hag e klaske displega e vennoz, rak

Lemenik en devoa lavaret : « Beza am eus c'hoaz ». Petra a zeuje goude en dije komzet ?

Ar respont a zeuas, 'met ne oa ket eus genou ar beleg. Ar respont a zeuas ken spontus ha ma c'helle dont.

E kreiz meren, paotr al lizerou a arruas d'ober e dro, hag ar vatez, hogos raktal, a zigasas ar c'helaouennou d'ar person ouz taol. Heman a grogas gante, eürus da c'hellout distrei e spered war eun dra bennak. Displega a reas eta unan anê hag a deue eus Pariz.

Ha Lemenik o welout e vreur o tont da veza gwenn evel eul lien :

— « Petra ec'h arru ganit, emean ? »

— « Sell ! eme ar beleg, 'n eur rei ar gelaouen d'ezan. »

Ha Lemenik da lenn :

« **Digouez spontus e Java.** — Eun enezen hag 20.000 a dud lonket gant ar mor. Eun

enezen reier savet e-kichen, eus goueled ar mor. »

Rik ar pezh en devoa lavaret Lemenik an noz diaraok. Ar paour kez beleg spontet, ken e grene, a zelle ouz e vreur evel pa vije bet heman eun ael pe eun diaoul. Skler awalc'h e oa e c'houlenne ennan e-unan :

— « Daoust hag hen e ouie heman, « dec'h da noz, pezh hon eus gouveet aman « ar beure-man hepken ? Ne ouie ket, me « zo zur. Petore den ez eo eta va « breur ? »

Lemenik ne reas van ebet ha ne voe ken komzet nag eus an douar nag eus an nenv.

Lemenik den hep aon

Eur wech all e voe pedet Lemenik gant kabiten eul lestr koant, e oa e porzig mor ar Yeodet, da vont gantan war e lestr

d'ober eur valeaden beteg enez Siek. War asant Lemenik e oa graet emgleo ha dibabet e oa an deiz. Heman a voe laketa ar 4 a viz Gwengolo 1883. Da 7 eur vintin e vije displeget al lien ha mar n'arruje ket Lemenik war-benn neuze, waz evitan ! al lestr ne c'hortozje ket anezan. Hogen eur wech ebarz al lestr, er mor bras, diwall mat d'ezan kaout poan-galon, pe spont, pe c'hoant da zouza.

An 3 e savas eur barr-arne 'vel ne oa ket gwelet aboue pell amzer. Ar mor a lamme war ar reier gant eur c'hounnar euzus. An avel a youc'he hag a rede 'n eur derri ar gwez war ar c'hleuziou hag o leda aneze a-dreuz an henchou.

E-pad an noz den n'hellas kousket gant an dourni a rê an avel hag ar glao. Gwasa amzer ! Lemenik a zonje e oa red d'ezan mont d'ar Yeodet an deiz warlerc'h. Eur banerad boued zoken 'oa bet aozet evitan

hag evit ar vartoloded gant bep seurt debrach hag evach.

— « Ne vezo ket brao ar mor, a zonje en e wele. »

N'eus forz ! Da bemp eur e savas hag en em wiskas ha setu-han eur pennadig goude, ar baner war e gein, war hent ar Yeodet. Truezus awalc'h 'oa an hent gant ar gwez draillet hag gant ar poullou dour.

Arruout a reas er porzig eur pennad araok seiz eur. Souezet 'oa an dud o welout anezan o tremen, rak an holl, er Yeodet, a ouie e zoare. An eil hag egile a lavare d'ezan :

— « Ne dalvez ket d'ec'h aotrou Yann. « Gant an amzer-man al lestr n'ez aio ket « er-maez. »

— « Ma ! eme Lemenik, neuze ec'h « adkemerin hent ar gêr. »

— « Gallout a ret hen kemer rak-tal. »

— « Red eo d'in gwelout kabiten al
« lestr da genta. »

Ha setu-han dirak ar c'habiten :

— « Oh ! vat ! eme heman, n'houllfec'h
« ket mont er-maez e-kreiz eur seurt arne ! »

— « Pa 'm eus roet va gir, eme Lemenik,
« ne zouzin ket. Mar chom al lestr er porz,
« me a yelo d'ar gêr, met mar da er-maez,
« me a yelo gantan. »

« Ne deufet ket ! na petra lavarfeho preur ? »

— « Va breur ? va breur ne blijfe ket
« d'ezan klevout am eus bet aon. »

Ar c'habiten n'en devoa c'hoan ebet da
vont war vor. Goude beza pedet Lemenik,
en eur ober eun tammig gwap outan, dre
ne oa ket merdead, setu breman ne c'houlle
ket souza, met lakaat Lemenik da zouza a
oa gwelloc'h gantan.

Koll a reas e amzer. Goude eun hanter
eur tremenet o tiviza, red mad e oe pe souza
a grenn, pe mont er maez.

— « Ma ! eme ar c'habiten, er maez
« eta ! »

An holl, endro d'ar porzig, a oa o c'horo-
toz Lemenik war e zistro d'ar vourc'h, gant
ar c'hoant, marteze, da c'hogeal anezan.
Pa voe gwelet o tisplega ar gouelioù war
al lestr, ar sperejou a droas. Den ne
c'hoarze ken.

— « Allas ! allas ! daoust hag hen ez int
« dibenn awalc'h evit mont er-maez ! »

An dremmou a zeue da dua.

Kabiten al lestr ha Lemenik a gemeras
ar vagig evit mont d'al lestr. Ha setu
heman raktal da sevel an heor ha da gemer
e herr, salutet gant an oll dud dastumet
war ar reier, o hinjal togou, ha mouchou-
rou, hag o krial da Lemenik ha d'an dud a
vor : « Kenavo ! kenavo ! »

E gwirionez, peadra a oa da veza spontet,
rak eur wech arru er-maez an aochou, al
lestr a voe darc'hoet du-man, darc'hoet

du-ze, war ar gwagennou, evel eur graouen.

Tro-ha-tro Lemenik a wele barrikennou, plenken ha bep seurt tracu o ruillal war an dour hag e sonje e teuent eus eul lestr bennak bet draillet, e-kichen, an noz diaraok. Heman a voe eur gwall dervez da dremen.

Ar vartoloded, gant o labour, a zelle ouz Lemenik, en gortoz, marteze, gwelout anezan o kaout ezom a zikour enep ar mor pe enep ar boan galon. Hogen an amzer a dremene ha Lemenik ne c'houlenne netra.

Da zeiz eur noz, p'arruas al lestr en euz Siek, Lemenik a oa gleb-dour, rak, epad an deiz, e oa chomet war ar bourz. Hogen breman n'en devoa ken da c'houzañv.

An nozvez a oa kaer evit distrei d'ar gêr. Peuc'haet e oa ar mor ha ken sklerijennet e oa gant goloioù an oabl, ken e seblante gant Lemenik e oa al lestr o ninjal dre an nenv...

An deiz war-lerc'h d'abardaez, Lemenik en em gave e Lanhuon en eun hostaliri 'lec'h ma oa kustum da vont hag eno, ouz eun daol, e skrive eul lizer. En dro d'eun daol-all e oa eun nebeut paotred o vutunat, pep a werennad bier dirake. Unan aneze a gomze :

— « An aotrou hen-ha-hen, emean, a zo
« arru eun taol fall gantan. E lestrig ken
« koant a oa aet er-maez d'ec'h e-kreiz an
« arne... »

Lemenik a voe red mat d'ezan klevout peza lavare en den. Digeri a reas e ziskouarn :

— « Ha beuzet ez eo bet al lestr, beuzet
« ar vartoloded, beuzet ive breur person
« Ploulec'h, aet gante da vale war vor. »

Eur vouc'hoarzaden a dremenas war vuzellou Lemenik :

— « Allas ta ! emean, ennan e-unan,
« eur wech, d'an nebeuta, am bezo klevet
« konta va maro. »

An den a zalc'he da gonta doaré spontus al lestr hep gouzout e oa breur person Ploulec'h o seleaou anezan, rak Lemenik ne rê van ebet.

Azalek neuze, an dud a vor, kouls hag ar gouerien, a anzavas kalon Lemenik. Hag eun deiz bennak ma tistroe a Lanhuon, war droad, gant daou gouer, ar re-man a voe souezet o welout petore kerzer e oa. Unan anê ne gavas nemet kement-man da lavarout d'ezan :

— « C'houi avat a zo eun drailler tud ! »

V

Mestroniez Lemenik anzavet gant tud ha loened

Red e oa da Lemenik, nemet dall e vije, gwelout e oa kalz a dud a bep stad o c'hortoz, eus e beurz, oberou dreist-ordinal.

Kouls e Pariz hag e Breiz, en deus kavet tud hag a gomze gantan eus e zoareou da zont. E Breiz, evel ma oa dleet, ez eo arruet ar re ar zouezusa azalek e vugaleach.

Komzet em eus eun nebeudig eus e blaneden e Rostrenn. E Gwengamp em eus diskouezet anezan er skolach. Met meur a dra a vije c'hoaz da lavarout.

Herie a vezo sklerijennet gant warc'hoaz

Setu aman eun digouez ha ne lavar ket nemeur a dra pa zeller outan en e-unan, met gwelet e vezo pelloc'h en devoa ive eun dalvoudegez.

E mezeven, bloavezh 1868, rener ar skollach a c'hoantaas mont da ziskouez e skolaerien e bro Gallak. Eur beure e voe laket eun toullad aneze da bignal en tri pe bevar karr-bankou, ha war-raok etrezek Kallak !

An amzer a oa kaer ha tomm ha beaji a oa brao. War-dro unnek eur an holl a ziskennas diouz ar gweturiou ha kelen-nourien ha skolaerien a gerzas bete Karnoet. Treuzi a rejont ar vourc'h, hag int war-zu Tosen Sant Gueltas. Lemenik a oa e-touez ar skolaerien yaouank.

Eur wech arru war lein ar menez, e voe

diskleriet d'ar grennarded al labour a zo bet graet war an douar-se en amzer goz, ha Lemenik a zigore he zaoulagad war bep tra, dreist-holl war al labour savet e penn-uhella ar menez : eur c'helc'h graet gant douar hag, en e greiz, eun toull graet evel pa vije bet da lakaat ennan eur peul bras-divent. Klask a rê en e spered da betra en devoa servijet al labour-se ha ne gave ket, na den all ne gave mui.

Goude eun eur bennak tremenet eno, ar valeerien a yeas da vernia da di eul labourer pinvidik a oa o chom e-kichen. Eur c'haer a bred a voe graet e-maez an ti, en disheol, ha levenez a oa en-dro d'an daol. War an diwez, setu unan eus ar gelen-nourien, eun abad, o sevel, hag hen da gana, gant eur vouez vraz, eur zonaden graet ar bloa diaraok, gant an Aotroune Thielemans ha Roparz, en enor da Vretoned Breiz-Veur deut da Zant-Briek da we-

lout o breudeur a Vreiz-Izel. Ar zonaden-se a zo hanvet *An diou Vreiz*. Kalon ar baotred yaouank a dride en o c'hreiz o klevout an toniou koz displeget, ar gwerziou ken mat da zevel ar spi er Vretoned.

Hogen distroet d'ar gêr, Lemenik, ne ouie mui da betra e oa bet kaset d'ober anaoudegez gant Tosen Sant Gueltas : c'houec'h vloa ha tregont en dije da c'hortoz araok beza sklerijennet war gement-se.

An toaz en go

Lemenik a oa kroget da studia stard doareou gouenn-dud ar Vretoned aboue ar bloavez 1895, pe marteze eur bloa ben-nak kentoc'h.

Er bloa 1897 en em gavas e Rosko, gant e wreg, hag int deut eno da dremen ar miz ehan-hanv. Ober a reas Lemenik

anaoudegez gant enezen Vaz hag e welas ive kêr Vontroulez.

Ar bloa war-lerc'h, da vezeven, e teuas, adarre da Enez Vaz rak houman he devoa plijet kalz d'ezan gant hec'h iliz koz, gant he farkou hag he reier. Skrivet en deus pennadou koant awenet d'ezan e pad e dremen er vro.

Er mare-man e oa krog Breiz-Izel da zevel oberou nevez. Eun dra bennak a oa en aer, evel ma c'hoarvez, gwech ha gwech all, a-dreuz an amzeriou. Daoust ha ne vefe ket trompill an eneou o son e pevar avel ar vro !

E skolach Sant-Brieg ar c'helennour Fransez Vallée hag ar studier yaouank Fransez Jaffrennou a oa en em lakaet da studia war ar brezoneg ha war ar c'heum-raeg, da lavarout eo brezoneg Bro-Geumri. Ha ken tomm c'haoret e oa o c'halon, ken e tistroe kalz a baotred yaouank da labourat gante.

E keit-se an Ao. Kloarek, kannad Montroulez, a zave eur strollad c'hoarierien evit displega a-nevez c'hoariellou koz Breiz-Izel, kollet ar c'hiz anê aboue eun tregont vloa bennak.

Lemenik a lamme e galon gant al levenez o welout ar vuez oc'h adkregi en Breiz hag ec'h en em unane muia ma helle gant ar Vreiziz kalonek-man.

Hogen Bretoned ar vro ne blij ket d'eze nemeur Bretoned Pariz ; alies zoken ez eo bet gwelet Bretoned Breiz o pellaat dioute Bretoned Pariz, goude beza impliet an oberou graet gant ar re-man. Red eo koulskoude asanti ez eus kerkouls kalon e Bretoned Pariz eget er re-all pa 'z int chomet feal da Vreiz, d'he yez ha d'he spered. Meur a hini a renk kuitaat e vamm-vro evit gonid e vuez hag a chom bepred Breizad a galon hag a Spered.

Lemenik ne c'houlenne netra digant

den. Labourat a rê sioul, herve e c'hoant, war e vennoz ; hag e rê eus e wella, e gwirionez ; evel ma vezo gwelet, e skoazelle Breiz hag ar Vretoned, koz pe yaouank, en e bennadou skrid. Eul levenez dispar e oa e hini o welout Breiz o tihuni.

Ne sonje netra mui o tont da Enezen Vaz.

Mestroniez Lemenik war al loened

EN ENEZ VAZ. — Eur beure e oa o vale gant e wreg, e tu ar reier, dirak Santek, palafennou bihan, pers o liou, a nije 'n eur c'hoari dindan bannou an heol, ha Lemenik hag e wreg a gemere plijadur o sellout oute, rak eun dra lirin e oa kement-man. Eun nebeut dioute, evel pa o dije intentet pezh a lavare an daou bried, en em lakaas da c'hoari-nij dirak Lemenik, hag

eur pennad goude, setu tri aneze oc'h en em zistaga diouz ar re-all, o trei hag o tistrei, evel o terc'hel d'a c'hoari, hag o tont, a-gevred, d'en em bega eeun war galon Lemenik.

— « Sell 'ta ! a lavaras heman d'e bried.
« Diwallomp da ober aon d'eze, ma wel-
« fomp pegeit e chomfont aman. »

Souezus e oa gwelout loenedigou ken aonik hag ar re-man o chom seder war vruched an den. Lemenik a zalc'has da vale pell amzer er c'hiz-se gant an taer balafen. D'an divez e kasas aneze kuit.

A boan ma oant pellaet, Lemenik a gavas eur zouezen all war e hent. Kals a gilleri a zo en Enez Vaz. Unan a ziskennas war ar wenojen, eeun dirakan, hag a chomas war an douar, e-kichen e dreid, da zellout outan.

— « Petra c'hoarve gant al loened ar beure-man, a lavaras d'e wreg ? »

Ha setu int o daou chomet en o sav da zellout an evnig bihan a oa manet eno hep aon a grenn. Lemenik a stouas evit tremen e zorn war ziweskel an evn, hag heman raktal a zavas en aer en eur gana.

E BRO GEUMRI. — Gwelout a raio c'hoaz Lemenik al loened o tont en-dro d'ezan meur a wech.

Dalc'het en devoa sonj a gezeg kastel Llanover, e Bro-Geumri, 'lec'h ma 'n em gave en 1889. An Itron Herbert, perc'hen ar c'hastel, a oa aet da gerc'hat Lemenik d'ar porz-houarn, en he gwetur, hag eun itron all ganti. Lemenik a zeuas gante, ha setu an Itron Herbert o lavarout d'ar blesnier troc'ha berr-ha-berr, dre ar park-liorz, elec'h heul an hent-bras penn-da-benn. Ar wetur en em gavas eta da redek war yeot ar gozen-liorz. Raktal, a bep tu, kuitaet gante ar peuri, kezeg koz a strollad, en em lakaas da c'haloupat war-lerc'h ar wetur.

— « Buanoc'h ! buanoc'h ! a grie an I. Herbert. »

— « Perag ? eme Lemenik, n'ez oc'h
« ket kustum da welout aneze o redek
« evel-se war-lerc'h ho kwetur ? »

— « Biskoaz kemend-all n'am boa gwe-
« let, eme an Itron. »

Ha setu Lemenik, hen distroet, oc'h aesa
pellaat an anevaled 'n eur hija e dog. Ye
da ! Ar c'hoz kezeg a zalc'he da c'haloupat
en-dro d'ezan, hag o zellou warnan, met
sellou mat ha tener ha nan sellou drouk.

C'hoarzet en dije Lemenik ma vije bet
en e-unan. Hag ar c'hezeg a zalc'has d'hen
heul, ha dalc'het o dije moarvat pell amzer,
paneved e troas ar wetur en-dro d'ar
c'hastel.

E NORMANDI. — E Normandi e
c'hoarvezas gantan ive eun dra bennak
henvel. Tremen a rê dre eur prad, gant
eur plac'h yaouank, merc'h eur vignonez

d'e wreg, hag er prad-se e oa ejenned,
saout, kezeg, loueiou hag all, a vagad, evel
ma vez, war gozennou an Normandi. An
daou valeer a ye war-raok hep sellout en-
dro d'eze. Hogen eun dro bennak e tigouezas
gante trei o fenn hag int o welout an holl
loened dastumet d'o heul. Ar plac'h yaouank
a grogas ar spont enni, met Lemenik a
ziskouezas d'ezi al loened chomet 'n o zav
hep kerzet mui. Hag int o daou da vont
adarre, ha ken buhan all, al loened da vont
ive war o lerc'h. Ha ken lies gwech e
chome an daou valeer, ken lies-all al
loened a chome ive. Hag ar c'hoari-man a
badas ken ma oa aet Lemenik hag ar plac'h
yaouank e-maez ar prad.

Mestroniez Lemenik war an dud

Hogen ar souezusa n'ez eo ket gwelet al

loened oc'h heuil Lemenik ; an dud, int-i o-unan, a zellas anezan evel eur mestr : « C'houi eo ar penn-rener », a zo bet lavaret d'ezan alies.

E PARIS. — Eur wech, en 1903; en em gavis gantan 'n eur pred badiziant. Pa voe ar pred war e ziwez, an Ao. ar Goni-dek a zavas d'ober eur brezegen en enor d'ar paeron, d'ar vaeronez ha d'ar bugel ; ha setu-han, goude, o pleal gant tud ar pred :

—... Hag en ho mesk, emezan, ez eus eun den hag a zo eur gwir-benn-rener. Hogen ne larin ket dac'h e hano gant aon sevel gwarizi e kalonou ar re-all. »

Hag ouspenn eur zell a dremenas war Lemenik. Perag lavarout ar giriou-se ? Daoust hag anavezout a rê an Ao. Ar Gonidec an Diouganou ? Ne lavaras netra ouspenn ha koulskoude, hen ive, a helle kaout anaoudegez eus an diouganou bet

diskleriet gant eur gelaouen a Bariz hag a oa lennet gantan ha gant e dud. Diskleriet a oant bet ive gant eur gelaouen all lennet gant Bretonned Pariz ha gant eun nebeut Gallaoued.

Red eo lavarout penaoz, er mare-man, an darnvuia eus an dud, er Franz, a oa en gortoz eus eur zalver.

C'hoaz e c'hoarvezas gant Lemenik beza sellet evel seener an diouganou ha lavaret e voe ze d'ezan zoken.

Eun itron vras, oajet, a c'houlennas digantan eun deiz bennak :

— « Daoust hag hen ez eur klevet komz « eus eun diougan hag a zell ouz ho pro ? »

— « Ya, moarvat, emean. »

— « Ha gwir eo, emezi, e kredet ive e vezo pleet gant ar relijion pa vezo arru ar c'houlz gant an diouganou da veza sevenet ? »

— « Ya, emean, kredi 'ran kement-se ».

— « Allas ! eme an itron goz, gwaz a ze. »

Houman oa eur brotestantez hag he devoa aon rak cur gwall-zarvoud d'he relijion.

— « Pelec'h ez oc'h-hu ganet, a c'hou-lennas c'hoaz ? »

— « E kreiz Breiz, e Rostrenn. »

— « Ecce homo ! Ecce homo ! a skrijas an itron. »

Ha hi da zevel, da zaludi en-dro d'ezi ha da gwitaat an ti. Ecce homo ! e voe an diweza ger klevet gant Lemenik a beurz an itron-man ; rak eun nebeut deiziou goude, e kouezas klanv, ha teir zùn goude e voe douaret.

E LESNEVEN. — Greomp, mar karit, eun dibab e-touez meur a zigouez souezus, arruet e Breiz gant Lemenik.

Er bloa 1903 e voe pedet da vont da gendalc'h Kevredigez Broadel Breiz, e Lesneven. Ha dre ma oa, er mare-man, Drouiz-Meur a C'horsedd Gourenez Breiz-

Izel, lidou ar Gorsedd en devoa da ren ive.

Hogen ar yaou, io a wengolo, goude al lidou barzek graet e Plouneour-Trêz hag e Brignogan, e oa eur banvez e Lesneven.

War ziwez ar pred eun aotrou a zavas da brezegi hag a lavaras e vije kavet bepred, e Breiz, tud pennfollet evel Salaün ar Folgoat, gouest da argadi evit o bro.

Lemenik, savet war e lerc'h, a lavaras :

— « Trugarekaat a ran an Ao. C... a zo
« o paouez gervel Barzed Breiz tud penn-
« follet. Mar deo gwir, mad e vezo d'ar
« vro ha d'ezan e-unan kaout ar seurt
« pennou-man. Rak pegwir an dud fur ne
« gavont ket an tu da 'n em savetei, piou
« a zavo d'o savetei, mar n'ez eo ket ar
« pennou follet ? Ha neuze, da c'houzou
« pere ez eo ar re zota : pe ar re a gav ar
« re-all sperejou troet, hep gouzout doare
« dioute, pe ar re a gomz da dud ar vro-man

« herve o spered, herve o ezommou, ha
« herve spered ar re-goz ? »

Troet e oa an holl gant Lemenik, hag
an Ao. C... a reas eur skoulm war e deod
goude-ze. Hogen pa azezas Lemenik war e
gador, unan en e gichen a lavaras d'ezan :

— « C'houi a vezo hon impalaer. »

Lemenik en em zistroas da welout hag
hen ne oa ket an den-man eur gwapaer,
met pa welas piou e oa, e kredas da vat e
komze en den-se herve e skiant-reiz.

An nozvez-man a dlee kloza war eur dra
meurbet estlammus. Meur a Vreizad beo a
zo gouest da rei testeni ez eo gwir penn-
da-benn pezh a zo diskleriet aman war-
lerc'h.

Goude ar banvez e voe pedet eun ugent
bennak a dud, aotrounez hag itrounezed,
gant *Ti Kaniri Breiz* da zont d'eva eun
hanapad Champagn en Hostaliri an *Tri*
Beul.

Ar vodaden a oa graet en eur zal vras,
e penn-all eus ar porz, 'lec'h n'halle den
dont da drubuilla.

Ar gomz a redas diwar-benn eur plac'h
yaouank mud, eus ar Relek, a oa brud
diouti, er mare-se, er c'helaouennou. Ar
plac'h-man, keit ma oa o vesa he zaout, a
oa bet rentet ar gomz d'ezi gant eur paotr
koz, gwenn e vleao, dizanvezet ganti, hag
aet kuit, raktal, hep lezel na roudou na
doare er vro.

— « Hennez, eme unan bennak, ez eo
« marteze salver Breiz. »

— « Piou a oar ? eme Erwan Berthou,
« marteze 'man ar Salver en hon c'hreiz. »

Ne oa ket e c'her peurachuget ma voe
klevet eur pezh taol war eur prenestr hag
ar weren a gouezas a dammou er zal.

War-dro hanter-noz e oa neuze ha ne
oa den er porz. Batet e oa an holl ; pep-
hini a grene, kalz pe nebeut. Ha setu an

Aotrou Nicol, eil-maer Lesneven, den fentus, da lavarout, d'e dro, eun draïg all bennak ha da c'houlén eun asant-all. Rak-tal e k'uezas eun taol nevez war ar pre-nestr-all. Hogen ar wech-ma ne voe ket torret ar weren. Unan bennak a lammæs eus ar zal er porz e lec'h ne gavas den, ha 'lec'h ne glevas trouz ebet.

Hano Yann ar Fustek a voe lavaret adarre a vouez kuzet, e-touez an dud bodet, met Lemenik ne reas van ebet, herve e c'hiz.

An deiz war-lerc'h, a oa ar gwener, Lemenik a c'hoantaas prena eur walen-viz-eured a c'hiz koz hag en arc'hant, gant eur galon kurunnet war he fenn. Eun den yaouank eus an Naoned a gasas anezan d'eur stal a zigorre he dor war dachen kêr, hag eno Lemenik a brenas eur walen herve e c'hoant, hag en tu-hout, eur stagaden vantel en arc'hant.

EN ORIENT. — Ar sadorn da noz Lemenik arruas en Orient, gant eur barz all bennak evit beza e goueliou Brizeuk an deiz war-lerc'h. Ar barz Taldir Ab Hernin a oa e-touez ar varzed-mian. Alies en devoa pedet Lemenik da zont da Garnoet da dremen eun nebeut deiziou e ti e dud.

— « Ar wech-man, ez in, assur, eme Lemenik. »

Al lun da noz, goude goueliou Brizeuk, Lemenik a oa pedet da vont d'eur vodaden graet er C'helc'h Katolik ; ha mont a reas. Goulennet e voe digantan ober eur breze-gen.

Ha setu-han o komz diwar-benn Bretoned Pariz, drouk-komzet dioute alies e Breiz, ha graet d'eze dismegans a-wechou.

Pa voe achu ar brezegen eur beleg a zavas hag a lavaras :

— « Pa he deus eur vro renerien evel « ar re ac'h eus klevet henoz, ez eo dleet

« d'ezê sevel he c'halon ha gortoz he silvi-
« digez hep aon. »

An holl a asantas : Ha setu tri, eme
Lemenik ennan e-unan, 'n eur sonjal en
digoueziou Lesneven.

Ar beleg-man a zo breman eskop.

Ar meurz mintin, ar barz Taldir a grogas
en brec'h Lemenik :

— « Da Garnoet breman ! »

— « Deomp 'ta, eme Lemenik. »

Da bemp eur d'abardaez ez arrujont e ti
an Aotrou Jaffrennou, noter, eun ti koant
ha peuc'hus a zeblante mouzc'hoarzin ouz
ar re-all a zelle outan, eun ti a zigemer
mat herve ar c'hiz koz, renet gant eur
vretonez speredek, disket kaer, ha barzez
eus an dibab, an Itron Jaffrennou, mamm
Taldir.

Lemenik a oa o vont da c'houzout evit
petra e oa bet kaset da Garnoet c'houec'h
vloa ha tregont a-raok.

VI

Priadelez gant Breiz

Ar merc'her mintin, ar barz Taldir a
lavaras :

— « Ar beure-man, mar plij ganec'h,
« ez aimp d'ober eur valeaden bete Tosen
« Sant Gweltas. Prenet em eus eur vom-
« bard en Oriant ha c'hoant em eus da
« c'houeza enni du-hont war lein ar mene ».

— « Ma ! demp 'ta neuze, eme Leme-
« nik. Laouen e vezin oc'h adgwelout al
« lec'h kaer-ze. »

E zorn a c'hoarie dalc'hmat gant gwalen
Lesneven, rak houman ne chome ket war
e viz en despet d'e c'hoant da zougen
anezi.

— « Re vras ez eo ar walén-viz-man, a
« zónje. E Pariz, e lakin moanaat anezi.
« Neuze e chomo. »

Hogen ne rê van ebet eus ar stagaden-
vantel prenet a-gevred gant ar walén.

Setu eta Lemenik hag ar barz yaouank
en hent. Eur pennad goude e tremenent
dirak chapel goant Sant Gweltas, kuzet en
he c'hoad dero ; hag int da sevel ar
c'hrao.

Lemenik a zellas gant evez ar c'helc'hiou
toullet en douar, en eur glask en e spered
gant piou e c'helle beza bet graet al labour-
man. Koun an Drouized koz a zave bepred
en e spered, met ne gave netra nemet ar
mennoz-man : heman 'zo eul lec'h a voda-
den vras a dud evit lidou pe evit eun dra
pouezusoc'h c'hoaz marteze.

'N em gavout a rejont war griben ar
mene hag ar barz Taldir a hanve da
Lemenik ar menezioù all hag an holl vroioù

gwelet ac'hane. Eur wech graet an dro,
Lemenik a yeas da azeza e-barz an toull
kreiz, graet evel toul eur peul divent. Ar
c'hreiz a oa leun a vein. Taldir, azezet a
drenv e gein, war lein ar c'hleun, en em
lakaas da c'hoari war e vombard hag e
tenne diouti ton kaer *Bro Goz va Zadou*.

E keit-se Lemenik a zispenn e bern
mein. Met red e oa d'ezan ehana eur wech
bennak evit harz ar walén-viz da goueza.

— « Oh ! eme ar barz Taldir, achu
« gantan e zonaden, kaer ez pezo klask, ne
« gavfet netra en toull-se. Klasket ez eus
« bet ennan pell a zo. »

Ha Lemenik da sonjal, rak e spered a
boueze buhan pep ger ha peb tra :

— « Marteze 'ta n'ez oun ket deut aman
« da gerc'hat met kentoc'h da zigas eun dra
« bennak. »

Hag eul luc'heden a dremenas raktal en
e spered. Kerkent e lezas e walén-viz

da goueza e-kreiz ar mein, en dounder an toull.

Hag e keit-se Taldir a zone herda m'halle war e vombard :

— « Sav, Breiz-Izel, d'an nec'h da « Vannielou ».

— « Ma ! eme Lemenik d'ezan e-unan, « setu me eureujet da vat gant Breiz en « dro-man. Setu perak e prenis ar walen « e Lesneven. Ar barz mat-man, hep gou- « zout d'ezan, en deus sonet evit rei gloar « hag enor d'an eured. »

E-pad pemp bloa Lemenik ne lavaras ger ebet a gement-man da zen.

An eured estlammus-se a voe graet ar 16 a viz Gwengolo 1903. An Heol a verke 10 eur war gelc'h divent an oabl.

VII

Lemenik hag ar Broiou Keltiek

Eisteddfod Kaerdiz

Aboue donedigez ar Vretoned a Vreiz-Veur d'an Arvor, a zo breman Breiz-Izel, da lavarout ez eo aboue pempzek kant vloa, meur a emweladen a zo bet etre Breiziz Breiz-Izel ha Breiziz Bro-Geumri. En em anavezout o deus graet eta evel breudeur, rannet o broiou gant ar mor.

Er bloa 1837 an Ao. Hersart a Gervarker a oa aet da Vro-Geumri gant eun nebeut, tujentil a Vreiz-Izel. Chomet ez eus brud kaer a Eisteddfod Abergavenny.

Tregont vloa goude, en 1867, ar C'heumroiz hag eur Gall bennak, a Vreiz-Veur hag a Iverzon, a rentas an emweladen en eur zont da gendalc'h Sant-Brieg.

Ne voe graet emweladen all ebet gant lidou bete ar bloa 1899. Hogen er bloa-se, gras d'an Tad Hayde, da " Cochfarf ", da Fuñtec ha da Jaffrennou dreist-oll, eun emgleo e voe graet etre Keumroiz ha Bretoned evit kas eun nebeut eus ar re-man da welout o breudeur a Vreiz-Veur.

Er mare-man Lemenik a oa krog, aboue daou vloa da skriva eus e du da Vro-Geumri, ha pa oa arru ar c'houlz, eur barz a Gaerdiz a zeuas da Bariz da bedi anezan da zont d'al lidou barzek ha d'an Eisteddfod, divizet da veza graet an 19 a vez Gouere, e Kaerdiz.

Lemenik en em glevas raktal gant Bretoned a Bariz ha gant Bretoned a Vreiz-Izel evit sevel eur strollad kannaded.

Gant asant ar re-man ez eas da Gaerdiz, azalek deizioù kenta ar miz, evit studia ar vro hag evit aoza, evit ar gwella, an digemer a oa c'hoant d'ober d'ar Vretoned.

Gant pegement a garantez e voe digemeret hen e-unan, dreist-holl gant an Arouezvarz Arlunydd Penygarn, gant Cochfarf an douger-kleze ha gant an Tad Hayde, person Sant Peter! An holl varzed a heuillas ar skouer ha setu Lemenik o kavout, dre-holl, en dro d'ezan, kalonou birvidik ha gouest da barea pep tra herve e c'hoant.

An dujentil, kouls hag an dud a stad izel, a rê eus o gwella evit rei levenez d'ar c'hannad breton, kement ha ken bihan ken e sonje Lemenik :

— « Biskoaz 'n em buez n'em eus
« tanveet eul levenez evel houman. N'ez
« oun ket souezet mar kleven ennoun
« va-unan, aboue va bugaleach eur c'hal-

« vaden o tont a Vreiz-Veur, galvaden ar
« garantez an hini e oa ».

E kastel Llanover, lec'h ma oa bet digemeret ar Vretoned 62 vloa araok, gant Gwenanen Gwent, an Itron Herbert, he merc'h, a roas d'ezan ive eun digemer eus an enorusa. Chom a reas zoken, eur miz eno, goude al lidou gant Fransez Vallée, evit studia al levriou koz, kouls hag an dud hag ar vro. — Er bloavez 1913, Kaledvoulc'h aet da Eisteddfod Abergavenny, a yeas d'ober eur perc'hirinerez da Llanover, bleniet gant Sir Ivor Herbert, hag e voe diskouezet d'ezan kambr Lemenik hag al levrgell vihan lec'h ma labourer bemdez. Eur vatez goz, oajet a dremen pevar ugent vloa, a zeuas an dour war he daoulagad pa glevas komz eus Lemenik.

Lemenik eta a aoze pep tra evit donidigez Bretoned an Douar Bras, ha p'arruas ar

re-man e Kaerdiz, pedennou a c'hortoze aneze holl evit dont da veza digemeret difraez e tier aotroune Kêr-Veur Bro-Geumri.

Al lidou a oa bet reizet gant an Arwez-varz ha gant Lemenik penn-da-benn evit rei mat da c'houzout d'ar Vretoned dre belec'h mont ha dont. Ha setu pa ziskennas ar re-man diouz an hent-houarn, eur bern bras a dud a oa o c'hortoz aneze dindan renadurez ar Varzed. Ar Vretoned a glevas eno, dindan bannielou Breiz, o nijal 'us d'eze, prezegennou eus ar c'haera.

Lemenik en devoa en e spered eur mennoz kaer. Goulen a reas digant Bretoned an Diou-Vreiz hag hen ne vije ket mat ober evel gwech-all, lid ar C'hleze rannet. An holl a asantas gant joa nemet eur c'han-nad hepken. Al lid-man a zo bet krouet evit derc'hel an envor a gement-man : Pa voe rannet broadelez ar Vretoned koz, pep

kostezen a c'hoantaas c'hoaz kaout an digarez da genunani o c'herentiez pa zigouezche gante en em gavout war vor pe war zouar. Hanteri a rejont eur c'hleze : eun hanter a chomas e Breiz-Veur, eun hanter all a yeas gant poblerien Breiz-Izel. Hag aboue an amzer goz-se, pa 'n em gave pennou bras an diou vro da veza unanet, pep tu a zispake e hanter gleze hag an diou hanteren a veze unanet, hag an unaniez-man a bade keit ha ma pade an emweladen etre tud an diou vroad.

Setu eta graet, war c'houlén Lemenik, diou hanteren gleze evit ober, e Kaerdiz al lid arouezus-man.

Lidou Kaerdiz a voe meurbet kaer hag a badas eiz deiz. Hogen petra rê Lemenik er mare-man ? Kinniget e voe d'ezan enoriou bras epad ar sunvez, met hen a zinac'has dalc'hmat digemerout aneze.

— « Graet enor da hen-ha-hien ; laket

« pep kannad da veza laouen. Me am eus « awalc'h d'ober oc'h evesaat urz ar goue-
« liou, evit pezh a zell eus va c'hostezen. »

Ha n'asantas ket beza diskouezet evel eun den dilennet da gutuil enoriou diwar goust ar re-all. An traou a yeas eta mad-tre epad ar sunvez. Ha Lemenik a oa laouen, rak beza e oa eno c'hoaz, e tu-hont da Vretoned Breiz-Veur, Amerikaned, Iwerzoniz, Skosed, Kernewiz Breiz-Veur ha kals a Zaozon ive. Hag an holl dud-man e plijas meurbed d'eze ar Vretoned gant o gwiskamanchou ken koant ha gant o c'hustumou hep ardou.

Savidigez Gorsedd Breiz

— Petra ez eo ar Barz ?

— Ar baz a zo eur C'helt emskiantek ha galvet.

LEMENIK.

Aboue ma studie war vuez ar Gelted,

Lemenik a wele pegen talvoudus ez eo bet, evit Bro-Geumri, kaout eur Gorsedd Barzed hag a zalc'h ken stard gant spered ar Ouenn ha gant hengouniou ar vro. Mar gallfe Breiz-Izel kaout ive eur strollad barzed skiantek, a spered uhel ha diere, evel Barzed Bro-Geumri, daoust ha gwir spered ar Vretoned, elec'h beza distroet a Vreiz-Izel, ha distaget diouz an dlead breton; ne zeufe ket d'en em staga startoc'h oute ? Goude kement a amzer, kollet evit Breiz, setu e vije gwelet nibien ar vro o tiskouez d'ar bed an daolen eus ar vuez virvidik hag eus ar spered dispar a zo enni.

Gouzout a rê e vije moarvad tamallet d'ar varzed-se eun ober ken skiantek gant ar sperejou izel na welont er bed nemet politik ha relijion. Gouzout a rê e vije graet enebiez d'ar varzed gant ar re, a zeou hag a gleiz, a zo gouarnet gant eur spered enep-keltiek. N'eus forz, ar wirionez,

hervez e greden, a dlee trec'hi d'an diwez, pa vije deut ar Varzed da gaout eur gwir spered barzek ha d'anaout, reiz-mat, Gwir ar Ouenn ha mad ar Vro. Araok eta !

Breman pa oa graet Barzed a enor, dre asanti d'e c'houlén, gant ar Vretoned a oa aet da Gaerdiz, ne vije ket diez d'ezan ober eun dibab etreze, kemer ar re o devoa eur spered keltiek, hag urza an traou evel ma vijet dleet evit sevel eur Gorsedd neve ha distag e Breiz-Izel.

Hogen n'halle koulskoude seveni kement-se nemet gant aotreadur Gorsedd Ynys Prydain — ar Vamm C'horsedd, evel ma vez lavaret du-hont — Ober e reas eta eun emgleo, gant Arouezvarz Keumri, war an aroueziou ha war al lezennou da rei d'ar Gorsedd-mab (e Keumri ar ger Gorsedd a zo gwregel).

P'arruas Lemenik er gêr, e oa gouest da lakaat war zao Gorsedd Barzed Gourenez

Breiz-Izel. Skoazellet evel ma oa gant ar Varzed Abherve ha Taldir, Lemenik a welas an traou o vont buanoc'h zoken eget n'en devoa kredet, rak hast a oa e Breiz-Izel, d'ober ar c'henta lidou barzek.

Gorsedd Barzed Gourenez Breiz-Izel en em gavas krouet, e Gwengamp, e miz Gwengolo 1900, gant Aotreadur Gorsedd Ynys Prydain. Lemenik, war e c'houlenn, a voe hanvet Drouiz-Meur.

Ar bloaz war-lerc'h ne voe graet bodaden poblek ebet etre ar Varzed. E 1902 e oe graet, e Karnak, ar vodaden genta, dindan lagad an deiz ; digemeret e voe izili neve. Ar vodaden-man a oa renet gant Taldir.

E 1903, Lemenik a renas al lidou e Plouneour-Trez hag e Brignogan. Al lidou-man a zeuas da vad e tu-hont da vennoz Lemenik, ken e kavas, zoken, e oa gouest ar Gorsedd da gerzet hepdan en e benn. Eun nebeut miziou goude e kasas

e ziskarg d'an Arouezvarz Taldir hag an Drouiz Alc'houeder-Treger a voe hanvet Drouiz Meur, kemeret gantan eun hano neve : « Kaledvoulc'h ».

Bodaden Dublin

Lemenik a vevas goude-se eur vuez kuzet. Met red eo d'in c'hoaz distrei eun tammig war adrenv evit komz eus ar vodaden talvoudus dalc'het en Iwerzon en diwez miz eost 1901. Kêr-Veur Dublin, a oa bet dilennet evit ober enni an emweladen etre kannaded an holl Gelted, dastumet, ar wech-man, da ober anaoudegez vat hag evit en em glevout war reolennou an unvaniez keltiek.

Lemenik a oa eno pa zigoras al lidou. Ar re-man a dlee beza kaer meurbet. Gwelout a read Bretoned ha Skosed gant o gwis-kamanchou broadus, itronezed keumri gant

togou uhel, broziou ha davancherou sklêr, hag ar varzed gant o saeiou.

Ar guden-dud a oa dastumet e ti-kêr endro d'ar maer ha d'e wazed, gwisket hag harnezet, herve giz koz ar vro, gant mezer skler hag alaouret. Ac'hane ar guden a yeas dre ar ruio, bannielou ha sonnerien en he c'hreiz, ha diwallet gant gwardou kaer, war varc'h ha war droad, da gaout Ti ar Vodadeg e penn-all ar Gêr-Veur.

An arglouiz Kastletown, a gosa noblans ar vro, a urzas pep tra a du gant an oatrou Fournier d'Albe. Lemenik, bete vreman n'en devoa bet netra d'ober : hogen arrui oa e dro.

Eur maen-hir a voe douget e kreiz ar prosesion hag ar maen-hir-man a oa rannet e pemp loden hag ar pemp loden a oa arouez ar Pemp Pobl geltiek. Al lodennou a dlee beza unanet e kreiz ar vodaden, din-dan an hano a *Lia Keneil*.

Azalek arru an dud e Ti ar Vodadeg, setu eta laket al Lia Keneil el lec'h a enor, e kreiz ar zal vras, hag an holl Gelted dastumet tro-ha-zro. Ha setu kanerez ha setu zonerez war an telennou, ar c'haera ma c'hallfed klevout ; ha setu ive displeget prezegennoù entanet diwar-benn ar vreudeuriez azliammet goude kement a gantvejou. Tridal a rê an holl galonou hag an daerou a levenez a strinke a zaoulagad pep-hini. Kaerat bodaden e oe houman evit Breiz-Izel hag evit an holl vroioù keltiek !

Hogen Lemenik a gawe e oa dienez eus eun dra bennak el lidou-man. N'halle ket distrei e zaoulagad diwar ar paour kez Lia Keneil, a oa e kreiz ar zal, ha ne rê den ebet ken van outan.

Setu-han eta, goude al lidou, o vont da gaout an Arglouiz Kastletown ha da lavarout d'ezan :

— « Me gred ec'h eus eun dra bennak a

« dalvoudus d'ober c'hoaz gant al Lia
« Keneil pa 'c'heus kemeret kement a boan
« d'hen digas aman. »

An Ar. Kastletown ne lavaras ger ; met
goude beza sellet ouz Lemenik, e c'halvas
e skriver, ha pa oa arru heman e tistroas
war-zu Lemenik hag a lavaras :

— « Ne welan ket petra vefe c'hoaz
« d'ober gant ar menhir nemet eun test
« eus al lidou bet graet herie. Ha c'houi ?
« emean, d'e skriver. »

— « Na me kennebeut, eme an den
« yaouank. »

— « Ha c'houi ? eme an Ar. Kastletown
« da Lemenik. »

— « Ya, eun dra hag a blijou d'ac'h,
« zoken, a gredan, eme Lemenik ; rak gwel-
« loc'h eget ne vern petra, e tiskouezo d'an
« holl gwir abeg hor bodaden. Setu-han :
« Evit lidou an abardaez, e refet prena lie-
« tennou seiz pers, glas ha gwenn da lakaat

« en-dro d'al Lia Keneil ha pa vefomp holl
« dastumet adarre en-dro d'ezan, e lavarfet
« d'ar pemp pobl bodet ez eo arru an eur
« d'ober etreze eul LE a unvaniez peurba-
« dus. Hag e pedfet eun den a bep bro da
« zont da lakaat e zorn war ar MÊN bihan
« ha d'ober, pep-hini d'e dro, eue Le a
« unvaniez. »

An daou Iwerzoniad a voe eurus o kle-
vout ar mennoz-man hag an Ar. Kastletown
a drugarezas Lemenik a greiz kalon. Leme-
nik ne oa ket c'hoaz leshanvet LEMENIK met
hepdale e vezo heman e leshano.

Lemenik

D'an abardaez, pa oa dastumet ar C'hel-
ted er zal, goude an digoriou, ar breze-
gennou, ar zonadennoù, setu an Ar. Kast-
letown o tisplega evit petra e oa bet pedet
an holl Gelted da zont da Zublin. Hag hen

da ziskouez al Lia Keneil a da bedi eur c'hannad a bep bro da zont d'ober war ar mên eul le a unvaniez peurbadus. An holl a zavas gant eul levenez a leiz kalon ; an daouarn a strakas ha pep-hini da youc'hal, herda m'halle : Brao ! brao ! greomp al le ! greomp al le !

Pa voe graet ar peuc'h, an Ar. Kastletown a c'halvas da genta Lemenik da zont, evel kannad Breiz-Izel, d'ober e le. Hag eun all a bep bro a bedas ive. Ha setu-int o femp en dro d'al Lia Keneil.

— « Ha breman, eme an Ar. Kastletown, « mar deo youl ar Gelted dastumet aman, « pedet oc'h d'ober al LE a unvaniez peurbadus war ar menhir. C'houi, aotrou, « emean da Lemenik, a gentelio evit ho « pro. »

An holl Gelted a oa en o sao. Klevet ho pije eur gelienen o nijal er zal pa lakaas ar pemp Kelt dilennet o dorn war ar mênhir,

ken brao kempennet breman gant al liendennou seiz tri liou.

Lemenik a zavas e vouez,

— « En hano Breiz-Izel, emean, hag an « holl Vretoned, e ran al Le a unvaniez « gant an Holl Gelted hag ec'h hetan ma « pado an Unvaniez-man keit ha ma vezo « ar bed bed. »

Ar pevar all, war e lerc'h, a reas ive eul le e-kreiz al levenez hollek hag ar strakadennou daouarn.

Lemenik en devoa gonezet e hano a Lemenik, an hano bet lakaet war raok gant an Diouganer. Graet en devoa al LE war ar MÈNIK. (1)

(1) El levr *An introduction to Early Welsh*, by John Strachon, Manchester 1909, ez eus meneg, en hanez Arzur, tennet eus Leor Ru Hergest, eneben 161, eus Kador Llemenig tywysawc Kernyw, hag er geriadur e kaver :

Llemenig : *striding, bounding*

Striding a dalvez : a ya war-raok a gammedou hir.

Bounding a dalvez : a ya a lamm.
 Ar geriou-ze a zo troidigez genta ha dre-ze an
 hini wiran.

Beza ez eus eun all, yaouankoc'h, moarvat.
 hag a dro llemenig gant *salax*. Kavout a rer
 anezi e *Chrestomathie bretonne* an Ao. Loth, p.
 93 ; met geriadur an divez. p. 494, a ro ive
 lemenik = sautillant.

Kredi reomp eta e c'heller trei Lemenig gant :
 An hini a ya war-raok a gammedou hir, al
 « lammer ».

III

Ar Spered

Bretagne, c'est de toi que viendra
 le salut.

Y. B.

VIII

Breiz Veur ha Bro-C'hall An Emgleo Kalonek

Holl labouriou Lemenik n'int ket ana-
vezet, siouaz ! Met ar mad graet gantan en
deus douget frouez.

Lemenik a zo bet unan eus kenta obe-
rourien an Emgleo Kalonek etre Breiz-
Veur ha Bro-C'hall, an hini kenta, zoken,
a hellan lavarout. E dad-kaer, an Ao.
Edouard Krug, a oa o chom e niveren 11
e Bali C., e Pariz. An ti-man a oa d'an
Aotrou V., tad-kaer an Aotrou D., den
politik, hag a chome ive eno. Beza e oa
c'hoaz, en estajou all an ti, liverien all :

on aotroune Feyen-Perrin, Lapostolet, Eug. Feyen. An Ao. Krug a zalc'he eun « Académie » gant an Ao. Henner. Lemenik hag an Ao. D... a reas anaoudegez abred, an eil gant egile, e ti an Ao Krug hag e ti an Ao. Feyen-Perrin, 'lec'h ma veze bodadennou ijinerien-kaer ha tud politik. Gwelet e veze eno ar Jeneral Thibaudin, Waldeck-Rousseau, ar Jeneral Boulanger, an Doktor Liouville, kenta pried an Itron W. R., ar prins Stirbeck, ha meur a hini all.

Alies e tiguezas da Lemenik koms gant renerien politik ar vro ; aliesoc'h c'hoaz e tiguezas d'ezan komz, etre pevar lagad, gant an Ao. D... hag e reas da heman selaou e vennoziou keltiek. 'N em gavout e reas abred an Ao. D... a du gantan war pezh a zelle an unvaniez o oa mad ober etre Breiz-Veur ha Bro-C'hall, diou vro e lec'h ma 'zeus poblou keltiek dreist-holl, da

lavarout eo tud a hevelep gouen, gouest da 'n em glevout etreze.

P'arruas taol-Fachoda, er bloavezh 1900, Lemenik a ziskouezas d'an Ao. D... pegen euzus e vije stad Bro-C'hall keit ma talc'hje homan da enebi ouz Bro-Zaoz. En tu-hont, me gred en devoa bet Lemenik eun aotreadur bennak a Vreiz-Veur evit lakaat ar gozeaden da gregi war an danvez-man : mar ez eus sonj, eisteddfod Kaerdis a oe graet ar bloa araog. Darempredet en deus betek e varo gant diou itron vras a Vro-Zaoz (hep komz eus re Bro-Geumri) ; an itronezed-ma a oa sperejou eus ar c'hacran. Kalz a garante ha kalz a zoujans a zo bet diskouezet eus an daou du e-kerz an darempredou-man ha kalz a honestiz ive.

Honestiz Lemenik

Lavarout a rin c'hoaz ez eo marvet

Lemenik en eur stad ezommek — Ne lavaran ket evel eur paour, pegwir e oa e di leun a livadennoù hag a anebeuri a dalvoudegez — evel eun den ha ne glaskas biskoaz an tu da c'honid arc'hant gant itrikou fall. Gant dienez arc'hant ez eo bet stourmet alies da c'hellout mont da welout e vro garet ha da gemer ar gomz e bodadennoù ar Vreiziz, dreist-holl e-pad bloavezioù diweza e vuez.

Maro an Ao. Krug, c'hoarvezet er bloa 1901, a oa bet eur c'holl bras evit tiegez Lemenik.

Koulskoude Lemenik hag e wreg a gavas an tu d'ober, gwech an amzer, digemer mat d'ar Vretoned en o zi, ti kempennet ken kaer gant oberou an Ao. Krug ha gant re an Itron Mari ar Fustek.

Met red eo d'in lavarout — peguir ez oun bet test war euriou diweza Lemenik, kouls ha war bloavezioù diweza e vuez —

e oa ken bras an dienez en e di ken ne vije ket bet zoken peadra da baea e zouaridigez paneved e oa roet d'e wreg paour ar 500 liur a zo dleet gant kevredigez tud-impliet en Ti-kêr evit sikour douari pep ezel maro.

Goude maro he fried, an Itron ar Fustek a yeas da chom da « Beaumont en Auge », e Normandi, 'lec'h m'he devoa, eun ti hag eul liorz, herez he zud koz. Eno e varvas er bloa war-lerc'h hep lezel eur gwennege, roet ganti he zra en he beo.

Meur a C'hall a den gloar hag enor eus an Emgleo Gall-Saoz, sinet er bloa 1904 ha ne oar ket ez eo bet renket an traou gant eur C'helt bennak dizanvezet. An hini a henchas da genta ar mennoz kaer-man a zo chomet, evel e meur a zigouez all, en dounder e izelder, didrouz ha joaüs, graet gantan e zlead Keltiek, ha paet hepken gant testeni e emskiant.

IX

Skouer buez Lemenik

Holl d'an holl ha d'e vro

Dreist-holl en deus gwelet al lenner ez eo chomet paour Lemenik e-pad e vuez hag ez eo bet merket e baourentez gant an digouezioù a lakaas anezi da veza anzavet gant an oll. E Gwengamp pa gouezas ar gwalleur war e dud ez è d'ar skol hanter-wisket hag alies gant an naon. Stad e dud a oa ken kriz hag e hini. Eur wech ben-nak, evit dizamma ar re-man, o c'herent diwar ar maez a bede ar pôtr yaouank da zont da dremen eun nebeut deizioù en o mereri pe 'n o milin. Amzer vat a veze

neuze evit e gorf; hogen kaletoc'h amzer a oa red d'ezan kaout. Red 'oa d'ezan gouzanv ar brasa ezommou evid anavezout mat ar bed hag evit beza gouest diwezatoch da c'houzout pelec'h eman an droug ha pelec'h eman ar mad.

Gant e vamm ha gantan ez eus eta c'hoarvezet pezh a oa dleet: paourentez kriz ha merket a vat da veza anavezet en dro d'eze. Eur wech diskennet er stad a servijourez, e vamm, na den all, n'hallent dislavarout an diskenn. Eur wech arru e Paris, eus a Bondi, argaset gant an ezom bete beza paket gant gwardourien kaer, Lemenik n'halle ken dianzavout krizder e c'houzanv.

Bet en deus eta da enebi ouz ar wasa stad, ha red e oa d'ezan trec'hi ken na vije deut da veza anzavet, hag anzavet gant an dud vras evel eun den a spered uhel ha dispar. War ar poent-man e vije

meur a dra da lavarout ha digouezious souezus da ziskleria c'hoaz. Lemenik en deus kuzet aneze muia ma 'n deus gallet, met beza ez eus tud a stad uhel hag a hallfe rei testeni eus ar c'homzou hag eus an oberou o deus diskouezet skler mat pegen uhel e oa savet e spered a-us d'e stad a zienez. Pez ne gavas biskoaz ez eo ar binvidigez. Eurur an hini a gwita ar bed, distag diouz e vadou !

Paourentez, stourm ha trec'h : setu eun driaden hag a zell outan e-unan, war eun tu eus e vuez. Pellaet diouz ar gonidigeziou bras, tremenet ez eo evel eun den diskiant dirak an dud n'int stouet nemet dirak an arc'hant. Dirak an dud, a voe red mat d'eze an zavout uhelder e spered, ez eo ive tremenet evel eun den ha ne raje netra gant e spered kaer dre ma oa hep arc'hant ha dre ma n'houlle ket hen gonid o lakaat e enor dindan e dreid.

En tu all eus e vuez eman Breiz hag ar Gelted. Aman a-vat, eur wech krog gant e ober, Lemenik en deus-han meret evel ma plije gantan e-unan. Marteze ez eus digouezet gantan souezi eur Breizad bennak, gwech ha gwech all, dre na lamme ket war ar gonedigeziou evitan e-unan ha dre na rê ket an trouz en dije gallet lakaat ober en-dro d'e hano.

Mar deus unan-bennak hag en deus bet kasoni outan, n'ez eo ket assur abalamour d'eun droug bennak graet d'ezan gant Lemenik. Bet ez eo dreist-holl eun den a labour hag a beuc'h, troet d'ober ar mad en-dro d'ezan ha d'ober plijadur d'e genvroiz da gentan. Marteze, evel m'eman an darvoud, ez eo bet madelezus e-kever ar re o deus diskouezet outan eun tamntig kasoni, pe gentoc'h eun tamm yenien. Me gred n'ez eo ket bet roet d'ezan e wir gant an holl. Met ken bihan ez eo bet niver e zle-

ourien diwirion, ken ne reas van ebet.

Meur a hini en deus bet lod eus oberou mat Lemenik hep gouzout piou e oa o madoberour. Biskoaz Lemenik ne c'hoantaas tenna lorc'h eus e vadelez.

'N em gaout e reas eur bloa e Breiz, e-pad eun dervez hanv, en presbitor Tredrez, gant eur bagad beleien. E-touez ar re-man e oa unan a spered uhel, leun e galon a garante-vro hag a blijas dreist-holl da Lemenik. Heman n'ankouezas ket an dervez kaer en devoa tremenet e Tredrez. Eun dro bennak en em gavas er Franz eun eskopti hep eskob. Piou a vezo eskop nevez ? An hini a voe dibabet gant ar gouarnamant, a voe ar beleg breizad a blijas kement da Lemenik e Tredrez. Met biskoaz an eskob breizad n'en deus gouveet e labouras Lemenik evitan.

E oberou e Breiz-Izel, e Breiz-Veur hag en Iwerzon a zo deut da vat. An tu-man

eus e vuez en deus eta kompezet tu ar gwalleur, rak e pep darvoud ez eo bet trec'h d'e ober evid mad Breiz hag hini ar spered keltiek. Kement-se a zo bet anzavet gant kement-hini a zaludas anezan evel eur spered dispar hag alies evel eur penn-rener.

Herve lavar eur Breizad mat a Lesneven, en 1903, Lemenik a oa eur galon grenv ha tener ». Tener ez eo bet evit karout e vro, ha krenv ez eo bet dirak hec'h enebourien ha dirak enebourien hon gouenn.

Meur a lenner a vezo marteze souezet o welout Lemenik o kroui kevredigeziou, o labourat evit o c'hennerzi hag oc'h en em zistaga dioute pa vezent gouest da gerzet i o-unan. Sonjal a reont : setu aman eun den ha ne chom er c'hevredigeziou nemet e-pad an amzer a boan. Arru ar mare da vedi, e tec'h.

Hag ober a reas evelse. Perak ? Lemenik en devoa eun dlead a-us d'ar re-all : chom

diere. Red e oa d'ezan chom diere evit beza d'an holl. Abalamour da gement-man ne voe biskoaz gwelet ouz en em veska gant traou ar politik na gant re ar relijion, nag en em vouta en kevredigeziou skrivagnourien nag all. E spered a oa d'an holl, troet kals muioc'h evit ar beorien eget evid an dud pinvidik.

— « N'ez eo ket me, emean, am euz
« aozet va buez na troet anezi war an hent
« he deuz heuillet. Meur a wech em eus
« enebet, gant va holl nerz, ouz an dar-
« voudou a welen o tont. Meur a wech em
« eus graet eus va gwella evit trei hent
« hag evit kemer an hent nevez a gasche
« ac'hanoun, evel ar re-all, d'ar binvidigez.
« Meur a wech em eus sonjet e c'hallen
« c'hoaz, en tu-hont d'ar binvidigez, klask
« plijaduriezou ar vuez koulz hag ar re-all.
« Meur a wech em euz goulennet, diganin
« va-unan : Petore beli a harz ac'hanout

« da heuil kredennou ar re-all, pe da gemer
« eur greden nevez e-mesk ar re a ziwan
« niverus dre ar bed ? »

Meur a wech e sonjas ive :

— « Perak, pa 'm eus graet eun aesa,
« pe eun all, pe evit gonid, pe evit plija-
« duri, pe evit kredi, pe evit oberi, perak
« e kavan peuc'h ha levenez pa vez dis-
« trujet va c'hoant, evel m'arrue gant va
« mamm ive ? »

Mouez ebet ne respounte da Lemenik e-touez an dud, met marteze 'us d'ezan eur spered bennak a c'hoarze dre ma oueze reiz-mat e oa red da Lemenik heuil e hent e-unan ha lezel ar re-all da bleustri o hini.

Dre forz mont en devoa anzavet mat n'en devoa netra d'ober a well er bed nemet labourat evid an dud pegwir ne deue da vat gantan nemet pezh a rê evit ar re-all. Eurvat a zo bet eta evel-se evit ar re o deus-han pleustret.

— « Deut oun da c'houzout, emean, ne
« dlean ket mirout va spered evidoun va-
« unan. Piou a oar ? mar em bije bet eur
« binvidigez all bennak, dindan va dorn,
« moarvat, em bije graet hevelep impli
« ganti. »

Red eo embann a vouez uhel en deus
roet Lemenik gwella frouez e spered d'e
vignoned, dreist-holl da ebestel an ober
barzek e Breiz-Izel, — e Bro-Geumri,
zoken — hep goulenn an distera tra na
meleudi.

Mennoz Lemenik war c'halvedigez Breiz

Dont a ra d'in meur a zonzj a gomzou
uhel Lemenik diwar benn galvedigez
Breiz :

— « Herve va c'hreden, eme Lemenik,
« Breiz-Izel a zo bet savet gant an Holl-

« C'halloudeg evit beza skoazel Bro-C'hall.
« en he brasa ha krisa ezommou. E-kerz
« ar Brezel a Gant vloa etre Breiz-Veur ha
« Bro-C'hall, ar Breizad Gwesklin en deus
« harpet kaer ar C'hallaoued enep ar
« Saozon ha dindan renadur Charlez VII,
« eur Breizad all, Arzur Richmond, en eus
« boutet ar re-man er-maez a Vro-C'hall
« goude emgann Formigny. Ar C'hallaoued
« hag o levriou a zo mud war ober dispar
« Richmond hag a lavar ez eo Janedik Ark
« a garzas ar vro diouz ar Zaozon. Ar gaou
« a zo gante, rak Janedik Ark a lavare hi
« hec'h-unan e Reims : Diwezet ez eo va
« labour pa 'm eus laket ar gurunen war
« benn Charlez VII. Ha setu c'hoaz eun
« testeni : Losket ez eo bet Janned Ark, e
« Rouan, ugent vloa araok emgann For-
« migny. Gwir eo eta ez eo bet ar Vretoned
« salverien Bro-C'hall er mare-se ; met
« gortoz an anzav a gement-se a-beurz ar

« C'hallaoued ez eo koll hon amzer.
 « Hogen ar wirionez a zo ar wirionez hag
 « an Hini en devoa kaset ar Vreiziz a
 « Vreiz-Veur da Vreiz-Izel en amzer goz,
 « Hennez ne vez ket faziet. »

Ha Lemenik a beurdalc'he :

— « Diwezatoc'h pa oa deut Rouelez
 « Bro-C'hall da veza eur vez evit ar vro,
 « ar Vretoned a grogas d'ober brezel d'ezi
 « e Breiz-Izel hag o gwad a ruillas keit ma
 « klaskent diskar beli ar Roue e Breiz. Ar
 « stourn ne daleas ket d'en em leda pel-
 « loc'h; hag er bloa 1789 setu voe red
 « d'ar Roue gervel kannaded ar Rann-
 « vroïou da zont da Bariz, da lakaat urz e
 « lec'h ma oa an dizurz. Petra 'reas ar
 « Vretoned ? Kroui e Pariz ar gevredigez
 « hanvet ar C'hlub Breton. Eno en em
 « lakajont, gant kement a galon, da bre-
 « zegi ar C'hallaoued war anaoudegez o
 « gwirïou, war an henchou heuillet a vis-

« koaz gant ar Gelted, o zadou, ken e voe
 « sklerijennet sperejou ar C'hallaoued. Ar
 « C'hlub Breton a zeuas da veza Klub ar
 « Jakobined. Savet e oa ar Reveulzi vras
 « dre c'halloud ar Vretoned, hag ar
 « Rouelez a yeas da goll.

« Ne vez ket graet enor a gement-se d'ar
 « Vretoned. An dud diskiant a heuil an
 « aliou a zo o redek dre ar bed, dalc'hmat,
 « enep ar Vretoned. Hogen ar Vretoned
 « disket hag emskiantek a oar pelec'h
 « eman ar wirionez.

« C'hoaz e tiguezo gant Breiz-Izel
 « c'hoari war dachen Bro-C'hall. An holl
 « a oar pegen dister ez eo arru stad ar bed :
 « Sellet e krec'h, sellet e traou, sellet a
 « zeou, sellet a gleiz, ar bed a strak evel
 « eun ti re goz, fraillet ar mogerïou anezan :
 « Kaer en deus ar bolitikerien, ar romaniz,
 « an dud en karg, an dud pinvidik ober eus
 « o gwella evit touella ar bobl dister hag

« ar beorien war o stad, eman arru an
 « divez. Breman ez omp dirak eun tremen
 « evel n'ez eus bet hini aboue 2.000 bloa.

« Dre gemen an Holl-C'halloudeg, Breiz
 « hag ar Vretoned a zo o vont da zevel evit
 « skoazelli Bro-C'hall hag ar bed e-kreiz
 « an darvoud spountus-man. Nerz ha kalon
 « a vezo ret kaout evit pleal gant eun ober
 « ken divent ; met pa vezo sevenet hec'h
 « amzer, Breiz a zigemero he gopr digant
 « an Tad, hervez gwirionez he buez hag
 « hec'h oberou mat. »

Me a lavar d'ac'h, Bretoned, mouez
 Lemenik a zo bet, en digor an Amzer
 Nevez, mouez an Emskiant keltiek. Hekleo
 ar vouez-se a dle tregermi da virviken en
 emskiant Barzed Breiz.

Lemenik labourer ar sperejou

Araok kregi gant e ober bras, Lemenik
 n'ez eo bet sklerijennet war e stad nemet
 tamm-ha-tamm, deiz-ha-deiz. A belec'h ez
 eo deut ar sklerijen d'ezan ? N'ez eo ket a-
 beurz an dud, rak den n' eo bet ken skle-
 rijennet hag hen e-unan war an traou
 keltiek. Mar deo deut ar sklerijen-se eus
 eun tu-bennak, red eo kredi ez eo deut eus
 eul lec'h hag a zo uhelloc'h eget ar bed-
 man. Pa zonas an eur, youl ha spered
 Lemenik a heuillas an hent eeun. Biskoaz
 n'hallaas distrei diwar an dlead.

— « N'hallan mui sonjal, eme Lemenik,
 « e oa dleet d'in senti ouz hen-ha-hen, nag
 « ouz roue pe impalaer nag ouz kreden
 « ebet ; rak gouzout a ran dreiz-oun va-
 « unan, n'ez eo stag an Holl-C'halloudeg
 « nag ouz kreden varvel nag ouz gouarna-

« mant ebet. An Holl-C'halloudeg a zo tad
 « d'an holl hag an holl dud a zo sellet
 « gantan evel e vugale. Eun urz vat ez eo
 « eta lakaat unvaniez etre an holl dud.
 « Hogen dre n'houl ket an dud nag unva-
 « niez na breudeuriez, dreist-holl e Bro-
 « C'hall, kement-se marteze ne vezo ket
 « sevenet gant komzou hepken. Digoueziou
 « gwasoc'h a zo diouganet d'ar bed. Ar
 « gwad a redo hag an tan a yudo war ar
 « c'hêriou. Eur gwall-amzer a vezo da
 « dremen. »

Lemenik ne c'houllas digant den a betore
 kreden pe a betore tu e oa, na pe oa paour
 pe pinvidik. Evit an holl e oa e gomzou,
 hag an holl, goude beza selaouet anezan,
 a oa welloc'h a ze.

Stournet en eus evit ar gwir kepken hag
 evit ar wirionez.

— « Ar wirionez, emean, n'ez eo ket
 « klenket nag en yalc'h heman nag en

« yalc'h hennez. Lugerni a ra en nenv,
 « kement hag an heol, ha mui, evit pep-
 « hini. Evit gwelet anezi n'ez eus ezom
 « nemet da zigeri daoulagad ar spered,
 « elec'h digemer, evel eun dal kreden
 « heman pe kreden hennez hag o deus
 « marc'hadourez da werza. »

N'ez eo ket savet Lemenik da vrezelli
 hep beza bet galvet ; ne oa ket deut da
 lakat brezel hep ezom, met da lakaat ar
 peuc'h e oa deut.

— « Mar doun, emean, e diwez e vuez,
 « gwir den an diouganou, goude kalz a
 « emgannou, kalz a darvoudou spontus,
 « kalz a drubuillou, am bezo digaset ganin
 « ar spered a beuc'h. Ar re a vezo bet
 « kelennet ganin e vezo gante an trec'h
 « bepred. Lemenik a vezo en o c'hreiz, a
 « spered, mui c'hoaz eget a gorf ha seul
 « vui e teuio o spered da ledanaat, seul vui
 « e vezo anavezet gante... »

— « Arru omp, eme Lemenik, en eur
 « c'houlz lec'h ma 'z a pep tra da goll : ar
 « Galloud, ar C'hredennou, an Urz. An
 « traou-man n'int bet dalc'het en broiou
 « ar Sevenidigez aboue 2000 bloa nemet
 « dre veli an armou oc'h ober gaou ouz
 « an dud, ouz o spered, ouz o labour. Dis-
 « karet eo breman ar Galloud, ha dre n'int
 « ken skoazellet gantan, ar C'hredennou
 « hag an Urz a ya da goll ive. An Holl-
 « C'halloudeg, mar lezfe an traou da vont
 « er c'hiz-se, a lakafe en Deneliez da drei
 « war-zu ar gouezder, hag an douar da
 « veza preiz al laeron hag ar wasa torfe-
 « tourien, Aboue kant vloa, dreist-holl
 « eman er bed sevenet o trei hag o tistrei
 « war eul leur re vihan gant ar c'hoant
 « d'he c'huitaat hep kaout an tu d'hen
 « ober. Gervel a ra sklerijen eur Zalver
 « bennak. Hogen al lezen a ren ar bed ez
 « eo lezen ar Welladurez. N'ez eo ket eta

« war adren e tle an dud mont ; kelennet
 « em eus d'ar Vreiziz hent ar Zilvidigez. »

Arruout a raio eun amzer hag e vezo
 barnet labour varzek Lemenik gant an holl
 Vreiziz. Neuze e vezo meulet e hano evel
 hini ar zalver a oa gortozet.

E c'hinivelez e vuez, e zremm koulz
 hag an diouganou war an amzer ma tlee
 beva, hag a zo sevenet breman, e gwirio-
 nez, a ziskouez d'imp ez eo Lemenik an
 hini a dleomp saludi, o sonjal ez eo an
 hini a zo bet galvet, aboue pell amzer,
 gant hon tadou koz.

Hanvet anezan ar Roue Arzur, pe Leme-
 nik, an hevelep hini a hall beza.

Gouzout a ran ez eus meur a hini hag a
 lavar n'hall ket ar Roue Arzur adbeva. Ar
 re-ze ne zonzont nemet e korf marvel ar
 Roue Arzur ha war gement-se n'heller ket
 dislavarout aneze, rak korf Arzur, evel korf
 marvel an dud-all, a zo teuzet ebarz an

douar hag en aer. Met e spered koulskoude, evell an holl sperejou, a zo beo hag a vezo beo da virviken.

Ha perag n'hallfe ket ar spered kaout ar galloud, pe an aotreadur, da guitaat e stad a spered hep korf evit dont c'hoaz, en eur c'horf all war an douar, e mesk e dud da 'n em wellaat pe da ziskouez d'eze e garantez peurbadus, pe da zevel aneze a zindan yeo an estren ?

Er c'hez-se piau a lavarfe n'hall ket ar Roue Arzur beza distroet etouez ar Vreiziz ? Mar n' eo ket eun dra souezus gwelout eur spered o tont eur wech war an douar, perag e vez souezusoc'h gwelout eur spered, an hevelep hini, o tont diou wech, taer gwech, mil gwech ?

Meur a hini a c'houlennno petore skoazel a roio Lemenik d'ar bed. Kas anezan war-raok etrezek e welladur ? Kalz a dud a lavar kemend-all pa vezont o klask beza

laket er c'huzuillou pe er Gannadelez. Pehini aneze en deus gwellaet ar bed ?

Komzet en deus Lemenik d'e vignoned eus an traou a zo breman en brall hag a zo o vont da goueza. Galvet en deus ar Spered da veza aotrou ar bed.

— « Pa vezo kouezet an traou, cme
« Lemenik, e vezo red sevel traou all en o
« lec'h. Daoust hag hen e vezo ar galloud
« d'hen ober ? Kalz a dud a lavar en deus
« ar Spered aotrouniez awalc'h war ar bed
« azalek breman, ha n'ez eus ezom ebet da
« glask sevel ar Spered uhelloc'h. Me a
« respont : An nep a gav ez eo mestr
« awalc'h ar spered, ar re-ze ne welont ket
« an traou war o zaou du ; ne welont
« aneze nemet diwar-var. Ne sonjont ket
« ez eus gwelloc'h impli d'ober gant ar
« Spered eget an hini a reont gantan. Ar
« re-ze a blij gante klevout ar vistri o
« lavarout : « N'ez eus netra en tu-all da

« bez a lavaromp ». Dre-ze n'ez eus ket
« ezom da gaout kement-se a Spered. »

« Nag a hini a chom war ar ger-se,
« divalo ha kousket, hep c'hoantaat anaout
« netra a nevez, na diwar-benn o buez
« o-unan, na diwar-benn o spered pe o
« c'horf, pe o bro, pe o gonenn. Displijout
« a ra d'eze gwellaat o c'homz, o stumm,
« evesaat o oberou ha studia evel m'ez eo
« dleet d'an den ober e-pad e vuez. Ne
« lavaran ket studia war levrou, met
« studia war gement tra a dremen dirak
« hon daoulagad. Ar gwsa evite ez eo
« lezel o emskiant da vorgousket, an ems-
« kiant a zo bet roet d'eze evit sklerijenni
« aneze war an droug ha war ar mad, ha
« da ziskouez d'eze o dlead en pep ober
« hag en pep komz.

« Evit ar re-man ar Spered a zo bepred
« re aotrou. Hogen beza ez eur darn all hag
« a gav ez eo re verr an hent heuillet gant

« ar Spered er bed-man. Aboue kant vloa,
« ar spered a zo bet troet war an ijinou,
« hag an holl a wel ez eus bet impliet eur
« galloud dispar gant ar Spered, dreist-holl
« aboue hanter-kant vloa. Ma vije bet dis-
« kouezet d'ar spered eun hent-all, perak
« n'en dije ket kerzet gant mui a aked
« c'hoaz war an hent-man ? Pep tra a dle
« dont d'e goulz. Breman, dre m' eo bet
« kavet, evit ar poblou, an tu da 'n em
« anavezout, breman pa ouzont pelec'h
« eman o bredeur war c'horre an douar,
« breman pa welont ez eus, e pep lec'h,
« mad ha fall, e pep bro, hag e pep stad,
« setu deut eur sklerijen da bara war o
« spered. Ha dre zikour an ijinou an hini
« ez eo deut ; rak ar re-man a lak an dud
« da vont war zouar ha war vor buan-
« buanoc'h da 'n em veska, hep kasoni
« nag enebiez.

« Koulskoude an oberou n'int ket c'hoaz

« dare da veza achu. Unan nevez a zo
 « d'ober hag a roio d'ar sperejou trist ha
 « naonek, levezet ha boued. Nebeut a stago
 « gantan da genta, met tamm ha tamm e
 « sacho ar gwella sperejou hag ar re-all a
 « zeuio war lerc'h. Ha pa vezo anavezet
 « buez Spered ar bed gant an holl, an holl
 « a vezo war hent ar welladurez.

« An ober-man a zo eun ober distag
 « diouz ar re-all ha ne vezo sevenet nemet
 « goude ma vezo bet lakaet eun urz nevez
 « er bed. Gant heman, en gwirionez, ez eo
 « red kentelia, rak an dud a intento anezan
 « da vat.

« Pez a zell ouz ar madou hag ouz ar
 « gwiriou a zo skler bepred evit pep den,
 « rak pep den en deus sellou lemm evit
 « pleal gante. Pa vezo gwelet ober lezen-
 « nou gwirion da rei e wir da bep-hini, ha
 « da rei d'ezan galloud da wellaat e stad ;
 « pa vezo savet an urz peuc'hus e lec'h ma

« 'z eus bet brezel bete breman ; pa vezo
 « gwelet ne zervijas ar brezelioù o deus
 « dizunanet ar bed, nemet da virout galloud
 « ar vistri, e-pad kement a gantvejou,
 « neuze en em stago ar bobl ouz al lezen-
 « nou hag e tifenno aneze beteg ar maro. »

... « Penaoz e vezo chenchet an traou ?
 « Gwelet e vezo d'ar c'houlz merket gant
 « an Tad da lakaat an toaz en go. Klevout
 « a rêr dre-holl an dud o klemm war an
 « neventizou a weler o sevel bemdez. Setu
 « labour ar go, ha war wasaat ez aio pe-
 « war wellaat, kentoc'h, hep paouez. »

Ar fornier ne oa ket pell. E hano e oa
 Lemenik.

Anavezet ez eo breman e Breiz-Izel pe-
 tost da veza. Lec'h all ez eo bet anavezet
 ive kalz pe nebeut. An deizioù araok ma
 tistroaz a Vro-Geumri, en 1899, eun tiad
 bras a dud a vlansonas evitan, hag a roas-
 d'ezan eur gurunen deillou dero. Ne voe-

ket laret ouz petore ober e selle ar gurunen-man. Perag ? Evit lezel ganti ec'h holl mennoz arouezus a gurunen.

Eun Hadour : setu eta pezh ez eo bet Lemenik. Hadet en deus ar spered barzek en eur park keltiek. Ar c'henta eost medet a vezo hadet adarre hag evelse, dalc'hmat, bete ma vezo goloet ar bed gwiniz ar spered barzek.

X

Lemenik ha gouiziegez ar bed

Lemenik a zo bet an hini en deus, en hon mare-ni, hag aboue pell amzer, anavezet ar gwella gouiziegez an Drouized koz.

Aboue ar bloavezh 1895 pe war-dro, en deus studiet dalc'hmat ar *Barddas* hag er studi-se ez eo bet diskleriet d'ezan ar mennoziou kaer a lakaas gwechall ar Gelted e penn uhella ar Sevenidigezh.

Met e spered n'eo ket bet chomet war an danvez dispaket dirakan, kaer en devoa an danvez-man beza kouls laret divent. Studi ar *Barddas* a zigor d'hon spered dorjoul an Divent hep Beven.

— « Ar *Barddas*, eme Lemenik, a zo *Alc'houez ar Vuez*. »

Lemenik, e diveza deveziou e vuez, a oa o labourat war eul levrig hag a vije bet hanvet *Gouiziegez ar Bed*.

Al levr-se, mar en dije bet amzer digant Mestr ar Vuez da gas anezan da vat, penna-da-benn, a vije bet, e gwirionez, unan eus ar c'haera a gement a hell an den kroui, dre uhelder ar mennoziou e oa da zisplega ennan.

Aman warlerc'h e roñ eun deillen dioutan a zell ouz pezh a zo hanvet « ether », ha n'ez eus bet kavet c'hoaz gant den eun displeg reiz anezan, aboue m'ez eo ar bed bed.

Aboue eun nebeut bloaveziou ar *Ouiziegez*, war bez a zell ar bannoberezh (radioactivité), he deus graet kavadennoù souezus ha kaer meurbet.

An hini ne gred ket c'hoaz en peurbadelez

ar spered, kaer en deus chom estlammet dirak kaerder ar c'havadennoù-man ne zeu d'ezan sklerijen ebet ouspenn war vuez an eneou er bed-all, pe'n eur stumm-lavarout all, war vuez peurbadus ar spered.

An hini a gred en peurbadelez ar spered a glask an tu da unani on Danvezelez hag ar Speredelez. Gwelout a ra, e meur a zigoueziou, bannerez (rayonnement), sacherezh (attraction), bannoberezh, testenioù eus eur vuez kuzet hag a zo ebarz an danvez kalet.

Diskleriaden Lemenik a daol bannou lugernus el luiaden-man, hag a zo gouest marteze da sklerijenni an unaniez a zo dre-holl er bed, etre an danvez kalet hag ar Spered, bete rei da gredi, zoken, ez eo graet an danvez kalet gant Spered en em wasket stard, ha netra ken.

AR BED

Pellen-heol, pellen-douar, pellen loar ha pel-

lennou-stered, war neun en eur mor divent, n'en deus na kreiz na beven. En tu-hont d'ar rann-ved kenta-se, tro-war-dro, rann-vedou all gant pellennou-douar, pellennou-stered, pellennou-loar, pellennou-heol, war neun bepred en eur mor divent ha tano.

Pelloc'h c'hoaz, ha tro-war-dro, eun hevelep mor ha war neun en e greiz, pellennou all : loariou, stered, heoliou ha douarou. Tro-war-dro bepred, strolladou pellennou, ha bep ma 'z a sell ar Spered pelloc'h, mui-ouz-mui e vez diskleriet d'ezan strolladou nevez ken ledan pep hini aneze hag ar strollad heolek ez omp-ni breman o veva en e greiz war hon fellen-douar.

Hag evelse pelloc'h, ha tro-war-dro atao, hep diwez ebet, na beven ebet etreze, na korn ebet, ken ne reont en o unaniez, nemet eur mor divent gant ar pellennou diniver war neun c'nnan.

Dre-holl e verv ar vuez. Dishenvel e pep pellen, ha dishenvel c'hoaz er mor a hanvomp an *Nerv* eun hevelep bervaden a geflusk anezi dre-holl, hag a daol bannou er mor diveven, pe an nenv, kouls hag er pellennou. Koulskoude n'ez eus tan all ebet da zerc'hel ar vervaden-se

nemet ar *Spered* a vag anezi. dre m'eman ennan tomder pep buez. Dre-holl eman o telc'hel buez ar bed, hag ar mor eman ar pellennou war neun en e greiz, pe an nenv — pe c'hoaz an *ether* — n'ez eo netra ken nemet eur MOR-SPERED.

Setu aze ar gavaden dispar a dle mirout da virviken hano Lemenik diouz an Ankouez. War ar ger-se e vezo, hep mar, savet, eun deiz da zont, eur greden nevez, eur ouiziegezh, eur filozofiezh nevez. Dal-c'homp :

Buez ar pellennou a zo ive enaouet gant ar sperejou a zo enne. Birvidik ez eo eta evel buez ar Mor-Spered, hogen gant muioc'h a c'halloud eget hini bleudennou an ether. An hevelep galloudou ez int koulskoude, hag o dastumaden er bellen — ha man all ken — a lak houman da veza krenvoc'h eget eur vleuden (atome).

Ar pellennou a zo eta war neun e kreiz ar Mor-Spered. Kaset int en-dro gant an nerziou a zo enne holl hag a zo hanvet ar bannerez hag ar sacherez. Ar re-man a lak pep-hini aneze da droka bannou a vuez gant ar re-all ha gant ar Mor-Spered. Hogen bale a reont a dreuz ar Mor-

Spered ; en eur drei, pep-hini warni hec'h-unan ec'h heuillont eun hent hag a zo d'eze o-unan.

Evel m'ez int stag ouz eur strollad pellennou ec'h heuillont, ouspenn, an hent a heuil ar strollad-se, en e bez, a dreuz ar Mor-Spered. Ar strollad-se, stag ouz ar strolladoù a zo en-dro d'ezan, a ra kement all gante ; hag ar re-man a zo ive kevren eus eur strollad brasoc'h hag a ra e dro, dre unaniez, gant ar Bed-Holl a zo kaset endro, en e bez, hep na chomfe ennan eur vleuden difinv.

An hed a zo etre ar bellen-heol, ar bellen douar hag ar pellennou stered, kouls hag etre o henchou, a dreuz ar Mor-Spered, ne gresk na ne woana. Pep-hini a vez dalc'het en e lec'h, hep na sevel na koueza, na dizrei war eun tu pe war eun tu-all, eus e hent. Ha koulskoude n'ez int douget gant netra, daoust d'eze beza bec'hiou a bouez. Gant o labour o-unan ez int dalc'het ha netra ken. Dre unaniez o galloudou, bannerez ha sacherez, e chomont e-pign er Mor-Spered hag e valeont, hep harz na kammegiez. Sachet war eun tu gant sacherez eur bellen bennak, sachet war eun tu all gant hini eun all, hag a ra kompouez d'an hini genta, pep-hini he deus

da zenti c'hoaz, tro-war-dro, ouz sacherezoù hag a zeu d'he c'haout a bell-pell bepred, ha dre ar Mor-Spered, evit ober kompouez an eil d'eben. Hag evelse e vez dalc'het didrubuil en e loden Mor-Spered.

An Nenv, pe ar Mor-Spered, n'hall ket beza gwelet ganimp en e zanvez, rak an danvez-se a zo re dano evit hon zellou. Ar re-man a dreuz an danvez-se hep hen gwelout, evel ma treuz hon c'horf an aer, en-dro d'imp, hep gouzout doare anezan. An danvez-se n'ez eo eta nemet BLEUDENNOU SPERED...

... Krouer ar bed a zo SPERED Hen e-unan ha n'ez eo nemet Spered. Evit kroui ar bed, evel ma ra, hep divez, nag ehan, n'en deus nemet eur vammen ma tennfe diouti ar Grouidigez. Ar vammen-se ez eo HEN-E-UNAN hepken. Dreze n'hall tennan dioutan nemet Spered. Ha setu perag *kenta danvez ar bed, an hini a zo dre-holl, a zo spered ha netra ken...*

XI

Maro Lemenik

War dro deiz kenta ar bloa 1910, Lemenik a reas ar goulen evit kaout e retred. N'halle ken stourm pelloc'h ouz e c'hoant da zistrei da Vreiz evit oberi e-touez ar bobl.

En zell e oa da vont da chom e-kichen Brest hag ac'hane da vont da vale ar vro a-dieuz hag a-hed evit sklerijenni, gant e brezegennou, Breiziz ar mæziou kouls ha re ar c'hêriou.

Nag a levenez a oa ennan o sonjal e oa arru ar c'houlz evitan da vale digabestr dre-holl, hervez e c'hoant.

Hogen en deiziou kenta miz c'houevrer,

Lemenik en em gavas diêz. An droug e yeas dalc'hmat war wasaat. E galon dreist-holl a oa skoet, ar galon he devoa karet Breiz, ar Vretoned hag an holl Gelted gant kement a dan, a nerz hag a zouster. Ar galon-man he devoa bevet, nan eur vuez hepken, diou pe daer vuez ne laran ket. N'halle ken harz ouz ar c'hilenved : re skuiz e oa.

Daou ezel a C'horsedd Breiz, Kaled-voulc'h ha Tangwall, en em gave bemdez e-kichen Lemenik e-pad an deiziou diweza. Hogen Lemenik hag e daou geneil a felle d'eze kaout bepred fizians : Ober Lemenik n'halle ket achui evel-se.

Setu arru a Vrest eur c'helou mat : kavet ez eus — ha miret eo, zoken — eun ti evit Lemenik.

Siouaz ! ar mezeg ne leze ken a esper. Met perag ne raje ket an Tad eur burzud !

Arru ar 15 a viz Meurz, ar c'hlanvour a

chomas war e wele, taget gant eun derzien ha ne dorre ken, na noz na deiz. E spered a oa en eur vervaden estlammus. Biskoaz ar spered kaer-ma n'en devoa roet eun testeni ken bras eus e nerz hag eus e gaerder. O pebez galloud ! O pebez mestroniez ! Aman, e oa Lemenik war leur amargad. O pebez blenier ! o pebez drailler tud ! Arzur war e varc'h, Kaledvoulc'h, e gleze, en e zorn hag an Tangwall war e lerc'h.

Graet evel-hen ! graet evel-se ! Stourmet aman ! brezel ! Trec'h da Vreiz !

E-pad eiz deiz ne baouezas ket e spered da vont a-dreuz hag a-hed dre Vreiz-Izel ha dre an holl vroïou keltiek. An Ober bras a oa krog ! Ar Bed a oa o vont da grena war e ael. Arru 'oa an eur evit ar Gelted. Arru oa *Ren an Spered* !

Penôz sonjal e oa an den-man dirak Falz an Ankou ! Biskoaz e spered ne oa bet kera ledan, ken galloudus.

Mar doa gwir ec'h arruje hepdale eur an disparti etre ar c'horf marvel hag ar spered birvidik, e welemp skler mat n'houlle ket heman na mervel nag en em zistaga diouz spered e genvroiz na dreist-holl diouz spêred e ziskiblien. Nan spered Lemenik ne strisas ket eur vunuden beteg ar vunuden diweza. Spered Lemenik a zo beo hag a vezo ganimp da virviken.

An 21 a viz Meurz, Lemenik a zavas diwar e wele hag ar mezeg hen kavas kalz gwelloc'h. Ra vezo meulet an Tad ! Ha setu ni da veuli e hano santel. Graet en devoa eta ar burzud a c'houlennemp !

An noz a dremenas sioulloc'h. Hogen da bemp eur eus ar beure, e-pad e gousk, korf Lemenik en em zistagas diouz e spered. Ar c'horf koazet a c'houite pa oa ar spered en e gaera splander.

Lemenik a zo bet douaret e bered Mene Merzer, e Pariz, e bez e dud-kaer, da

c'hortoz distrei e relegou doujet da zouar
Breiz venniget pa vezo sonet an eur da
embann e c'hloar e pevar avel ar Vro.

Breiziz, Keumroiz, Kernewiz, Albaniz,
Iwerzoniz, Kelted ar Bed-Holl, miret an
envor eus an 22 a viz meurzh 1910 !

Kan bale soudarded Lemenik

Setu Lemenik Meur o sevel eus e vez :

Savet eo ar Brenn !

Son 'ta, son va C'horn Boud, war lein Menez

Da zihuni va Gouenn ! [Arrez,

War ribl ar Ster Elorn e kerz ar Brenn brudet :

Savet ho penn, breudeur !

Enebourien hor Gouenn 'zo krenus ha spontet :

Setu Lemenik Meur !

Ar Brenn e varo gwenh a gerz eneb ar Gall

Pignet war gein e varc'h.

Sko 'ta, va c'bleze, sko ! Tor eskern ar re fall :

Darc'h 'ta, Kaledvoulc'h, darc'h.

Ar Brenn a ya d'an trec'h bag a gerz e Bro-

Araok 'ta, Bretoned ! [C'hall.

Ar c'hêriou 'zo losket, krog mat eo an Tangwall :

Diwall d'oc'h Gallaoued.

*Eur youc'baden skiltrus 'zibun ar Vretoned
 En tu-all eus ar mor.
 Deffro y mae y dydd ! Ye deffro gwyr Gwened,
 Potwys ha Dynefor.*

*Ha war lerc'h ar Brenn Meur e kerzomp-ni
 O youc'ha : Diwall d'oc'h ! [Kelled,
 Krenet, tud didalvez, krenet, poblou ar bed !
 Setu an Draig goc'h !*

Pol DIVERRÈS (Tangwall).

Teirnez Breiz

*An dizurz o ren pep broad
 Levier ebet evit leviat ;
 An arne o kroزال dre-boll ;
 Brezel 'tre ar mestrou diroll.
 Marc'heien, mevelien mestrou
 Breman diskoazel d'an Ankou.
 Spered roman maro en Breiz :
 Eur c'hoant hepken, hepken eur feiz.*

*Lemenik 'zo savet raktal,
 Arouez ar C'hrouer war e dal,
 E dal, mellezour spered fur,
 Hag en e zorn kleze Arzur.*

*'Deus kalon Breiz, bro an dero,
 Eo deut Lemenik gwenñ-baro.
 Evel eur paour eo tremenet
 E-touez an dud dall ha dallet.*

*Anavezout 'ra pephini ;
 A dost, a bell e oar barni.
 Disken e ray 'nep 'zo uhel,
 Sevel e ray 'nep 'zo izel.
 Divez an noz. Goulou-deiz, ru :
 Deiz an emgann vras 'zo arru.
 Gwad 'zo en oabl, gwad 'zo en dour,
 Gwad war gleze an argadour.
 Bek ar c'hleze stok ouz an nenv.
 An dremwel skubet a vrec'h krenv.
 Eneboui en, berniou war vern,
 Kig d'ar brini, d'ar chas eskern.
 Tan ha moged, listri war vor,
 E bek ar wern banniel Arvor.
 An trec'h da vordeidi Breiz ;
 Kig estren d'ar pesked da breiz.
 War zouar, na menez, na ster
 Evit harz ouz ar Brenin ter.
 Dre-holl an Trec'h ! Arru an eur,
 Strolladon Breiziz d'ar Gêr-Veur !*

*Strolladon-kad dindan an Arc'h :
 Brenin Lemenik war e varc'h ;
 Dindan arc'h bali vras Pariz,
 Lemenik en penn ar Vreiziz.
 Ar barz Marzin addihunet,
 Korn-boud Arzur en eus sonet,
 Zonet a galon virvidik,
 En enor ar Brenn Lemenik.
 Gant youl valelezes an Tad,
 Eo trec'h Lemenik en argad.
 Teirnez Breiz da virviken !
 Da Ouenn ar Gelted gouresken.*

Erwan BERTHOU.

(Kaledvoulc'h)

Kan Revel an Reizid

*Argadouyr ar sav d'an revel !
E ma an korn en och gelwel !*

*Gouyr kalonog, gouyr krev,
Krev och kalon, krev och enev !*

*Kemerouch och skoed, och hlezeu,
Deouch e maes euz och kartrev.*

*D'emziffenn hon gwlad Arvorig,
Da skoaz hon Brenin Lemenig.*

*Ar sav, digouezet eo an deiz,
An Brenin Arzur so 'n hon kreiz.*

*En hon kreiz an Brenin Arzur,
Get e geveill an Merzin für.*

*Lemenig Meur a so benour,
Ourz e elgez barvig gwenn flour.*

*Krev eo e vrec'h vel eo an dir,
Chwibanni ra e glezeu hir.*

*An gwad a red, kement darho
A zeou, a gleiz, a tro-ar-dro.*

*Gant gras Dion, deza vo 'n trech ;
Gwall drom d'an Gall edeo e vrech.*

*An trech so doch, Arvoris krev,
Genoch e ma Bren Meur an Nev.*

*Dibunouch Brezoned gwirion,
Dan och treid ieo an Estron !*

*Tor e ben ! Tor e ben d'an Gall !
A tor e ben d'an bradour fall !*

*Ken a Soson, a Revened ;
Oll Brezoned, oll gwir Geltied !*

*Dorn ourz dorn ! Kalon ourz kalon !
Kever an Gwezel, an Brezon !*

*En unvan get Iwerzonis,
Kernewis, Keumris, Albanis,*

TAOLEN

RAK-SKRID 9

KENTA LODEN

AR C'HORF

I. PAOURENTEZ.....	13
War varlen e vamm Breiz.....	13
Katel Goelo.....	16
Lemenik skolaer.....	18
Lemenik war e wele a varo.....	21
II. AR STOURM KENTA.....	25
War c'honid e vara.....	25
Stourm ha paourentez bepred....	30
N'ez eus ken da ziskenn.....	34
Mamm Lemenik.....	40
Divez ar boaniou.....	43
Maro e vamm.....	45
III. BUEZ NEVEZ.....	49
Lemenik den a bluen.....	49
Etre beui ha neuï.....	55
Planedennou.....	57

EIL LODEN

AR GALON

IV. LEMENIK HA BREIZ-IZEL....	67
Lemenik diouganer.....	69
Lemenik den hep aoun.....	75
V. MESTRONIEZ LEMENIK ANZA-	
VET GANT TUD HA LOENED.	83
Herie a vezo sklerijennet gant war-	
c'hoaz.....	84
An toaz en go.....	86
Mestroniez Lemenik war al loened.	89
Mestroniez Lemenik war an dud..	93
VI. PRIADELEZ GANT BREIZ....	103
VII. LEMENIK HAG AR BROIOU	
KELTIEK	107
Eisteddfod Kaerdiz.....	107
Savidigez Gorsedd Breiz.....	113
Bodaden Dublin.....	117
Lemenik	121

TEIRVED LODEN

AR SPERED

VIII. BREIZ-VEUR HA BRO-C'HALL	127
An Emgleo Kalonek.....	127
Honestiz Lemenik.....	129
IX. SKOUER BUEZ LEMENIK....	132
Mennoz Lemenik war c'halvedigez	
Breiz.....	140
Lemenik labourer ar sperejou....	145
X. LEMENIK HA GOUIZIEGEZ	
AR BED.....	157
XI. MARO LEMENIK..	164
GOUDE SKRID :	
<i>Kan bale zoudarded Lemenik.....</i>	169
<i>Teirnez Breiz.....</i>	171
<i>Kan Revel an Reizid.....</i>	174

GWENGAMP

MOULLET GANT TOULLEC HA GEFFROY

1874

1874

1874

FB
891.
683
BER